

ANNA

UR VUHEZ

E DOUARNENEZ

*komzoù dastumet gant  
Gwendal Denez*

hor yezh



An destenn embannet amañ  
he deus servijet da ziazez  
d'ul labour mestroniezh kinniget  
e Skol-Veur Breizh-Uhel, Roazhon.

R A K L A V A R .

Savet eo an destenn-mañ diwar divizoù enrollet war bandennoù magnetek. A.G., ur genwerzhoerez war he leve he deus asantet komz diwar-benn he buhez ha buhez he bro, a zo ginidik eus Douarnenez. He zud koulskoude a zo diwar ar maez. He yezh n'eo ket neuze yezh rik martoloded Douarnenez, yezh "war an aod", met yezh "laez kêr". Kavet vo enni stummoù komz eus ar broioù tro-war-dro Douarnenez. Kavet 'vo ivez un implij eus gerioù arnevez, a-wechoù distreset, evel "kenelied", da skouer. N'eus gant an destenn-mañ pal skiantel ebet. An abeg nemetañ a zo adreiñ ar gomz d'ar re n'o deus morse bet ar gwir d'he implij.

Kavet 'vo en dibenn un nebeut notennoù .

Embannet gant BARR-HEOL.

Jules GROS  
Diplômé d'Etudes Supérieures Celtiques  
de l'Université de Rennes

## LE TRESOR DU BRETON PARLE

(Eléments de Stylistique Trégorroise)

Troisième Partie

1974

## LE STYLE POPULAIRE

E gwerzh e ti

GIRAUDON

levrier

30 straed Kerampont

22 300 LANUON

Pellg. 35. 04. 90.

Priz: 63 lur.

Taolenn.

I. Familh ha bugaleaj	I
II. Ar vuhez e Douarnenez	22
Dislialde	41
III. Kollet er mour	46
IV. Kelou mat ha kelou fall	49
V. Ar brezel pevarzek	63
VI. Reuz ar brezel	66
VII. Friturioù, mistri ha grevou	69
Lec'hioù	77
VIII. Gouel ar Zakraman	78

Notennoù.

An distagadur	81
Gerioù	85



Skeudennoù.

An Hent Nevez	goude ar bajenn 2
Al lenn	goude ar bajenn 18
Bagoù sardin er fes	goude ar bajenn 26
Ar baotred kozh	goude ar bajenn 46
Ar Flimiou	goude ar bajenn 58
Ar c'hal savetaj	goude ar bajenn 64
O troc'hiñ ton	goude ar bajenn 70
Merc'hed ar c'horve	goude ar bajenn 74
Bagoù en aod vihan	goude ar bajenn 78

- 1 -

I

FAMILH HA BUGALEAJ.

Grizien om familh deus koste mamm : he zad a va ganet war Ploneve Porze... Trefunteg... ta' kouzh a va ganet e Trefunteg. E vamm a va bet intafvezet yaouenk-tre ga' nao growadur. Eof krowadur, matreze seizh 'loa, eizh 'loa, n'eus diwallet an defved war Mene Santez Ana gad on tamm bara zegel sec'h evit e bred kreiste... Vie kaset deus ar mintin war ar mene gad an defved... Hag or wech, or blei a va deut hag a noe laeret on dañvad bihen. Setu pa va deut d'ar gêr, eof a gonte fajlhe defi on dañvad hag ar mevel bras deus ar gêr-se noe respontet d'ar mest :

" N'e ket an dañvad nie allet mon gad ar blei me ar bugel nie allet mon kar va ke re vras evit or blei, " noe respontet ar mevel bras ; goude 'veljust a n'eus labouret vel labourer douar. N'ouzoñ ke pevare na penaos a n'eus desket e vichar kalve va'r maez 'vel ma ve lavert, da zével tired, ha d'obar kirri bras, pugur deus an amzar-se na teue ket an tren deus Kempar beket Douarnenez, ha tout ar charre vie graet etre ar c'hirri... Hag a laboure memes evit ar re Renot e Douarnenez 'vit ar c'hirri... Setu e be dimeet ga' ma mamm gouzh... ma fall doc'h a lavarign doc'h e ano a va Kemener, me mab da Mari Gerneiz a va... Mari Gerneiz ma mamm guñ... vie lavert deuzouto memes bugale Mari Gerneiz, pugur a vei chomet intafvez yaouenk... fi voar penaos nign a zalc'h ato ano ar merc'hed var ar vugale... bugel an ne ma nen... Setu ma mamm gouzh a va Anna Ar Gag he ano, he

mamm va or Barz... Barz he ano... hag a vei deus or gêr e Ploare, me noe kollet he zud yaouen-tre hag hi hag he breudeur 'zo be saet 'ti ar voerebed pe 'ti ar yonted... Mamm dign 'zo ganet er blavezh triwac'h kan nao hag hanter kan, hag an drae a va he c'herent... lakom aneo deus tregoù 'loa koushac'h eviti, hi vei ket ar c'houshac'h en ti, or breur henañ a noe, matreze 'zo be maro bugale vihen all arozi, me gout a raof, deus an drae mamm a noe choñj, va bet or c'houblad potred vihen, me, var he lerc'h pugur noe choñj mat deuzouto, me 'zo be maro bihen... hag a noe daou vreur, ign neuze koushac'h eviti... Mamm 'zo ganet var Kerzunoul Pouldraeged en or pennti, me pugur ta' kouzh noe allet deskif or vichar, a zo deut da jom e Pon Kerzodi etre Pouldeuilh ha Pouldraeged... me, deus an amzer-se, Pouldeuilh a va deus Pouldraeged, Pouldeuilh a va on draebon deus Pouldraeged. Setu ae noe saet on ti hag a va - deus an drae am eus choñj - hag a va ol liorz h plec'h a va gwe avaloù... avaloù mat-tre, ha potred Pouldeuilh, ar re gouzh, m'eus klevet e lavar : "Me 'zo be 'ti ho ta'-kouzh e laerezh avaloù deus ar gwe!"... Ha me 'm eus choñj or blavezh a va aet tad ha ma breur da ziskar an avaloù da da'-kouzh ; bihanig a vegn ha me a va chomet zindan ar venn, ha moe ke skian da zon kuit. On tok plouz va var ma fenn, hag a gweye an avaloù... setu a vleunjen zindan ar venn. Ha re yaouenk a vegn evit kawet skian da dec'hout kuit. Ha gwel' a raof c'hoa ta'-kouzh e sevel e ganenn : "Herri, Herri, an huni vihen 'zo zindan..." Ha ma c'hoar e ton en or redek da denn' ac'hanof deus zindan ar venn. M'eus anveet mat an ta'-kouzh-se. Ha pa teue e kêr, a teue da zrib' e legn ti mamm da greiste. Darpenn, pa e be chomet intañv, mamm-gouzh 'zo be maro pas yaouenk, me prim awac'h, e be chomet e-un en e di, me don a rae e kêr da zrib' e legn, ha deus an abardae, m'eus choñj mat, a yeyen gatañ da bourmen, ato da Bor-ru, er chanterioù plec'h vie saet bagoù, da zellar deus ar vichirourien e labourat. Ha deus an eskennourien,



An dra-mañ 'zo plasenn Tal a' Groaz hag an Hen Neve... An drae 'zo or gartenn deus naontek kan nav-naontek kan dek, pugur an ti aman fi vel, mamm n'eus prenet ane e naontek kan unnek, hag a va egise c'hoa. E-kichen va or baraer, ha d'ar baraer va an ti. Zirak a va on intron hag a verzhe bleunioù hag honne a verzhe ue linennoù 'vit mon da besketa. On troc'har blev 'va e-kichen... Ae 'va Porzh an Tachar, var an tu klei.

un zindan hag un var-gorre, hag an eskenn neuze e fon hag e ton. Darpenn, un deuzouto, deus an eskennourien-se a va be michirour gatañ... Eofñ, pa va e Pon Kerzodi, eofñ va ar mest, n'ouzoñ ke penaos a rae e gon, na ouie na lenn na skrivifiñ 'vel just, me graet n'eus bet aferioù... koulz a lavar, er baourente 'va neuze, memestra e vugale vegn ke deus ar re baoulañ c'hoà. Ti a noe ; an ti va deo. Tud 'zo noe tamm ti, noe tamm foz, noe netra... Ar re-se a veve er penntiez, fermourien gad ar re all... Setu mar plij ganoc'h d'ar mare-se... kafi 'loa 'zo, ta'-kouzh c'hoà noe on ti, noe on doenn evit ar vugale... A ! me, na ouie na lenn na skrivifiñ !... Darpenn, mamm n'eus kontet dign, e-lec'h mon d'ar skoul, ar botred a yeye da nufñ en or poull dour, ae va or vouez dour pas pell deus an ti ; e-lec'h beañ er skoul, a yeyen da nufñ ae. Hag on de, mamm-gouzh a vèle aneo e nufñ, hag an dilhad e-kichen, ign na vèlen netra, mamm-gouzh noe dispuñet tout an dilhad, setu pa vegn deut er maez deus an dour va mi tamm dilhad, oblijet da zon beket an ti en o ranig, en or lavar d'o mamm vegn aet da nufñ ha noe ke kaet mi tamm dilhad da viskiñ.

Mamm 'zo be pavar 'loa er skoul e Pouldraeged. N'eus be daou 'loa skoul-ret ha daou 'loa skoul-lojañ hag a vouie mat-tre lenn ha skrivifiñ, 'vel just n'eus be ue, kea, ar voutez deus ar c'houg pugur a gomze brezhoneg. 'Vel just. Me, skriv a rae mat ha lenn a rae brezhoneg mat-tre... Setu noe tri breur ha va nemeti a verc'h. Ar breudeur n'eus be desket o michar gad o zad, nemet ar yaouenkañ va deut e kêr da zeskiñ soudiñ ar bouestoù. Me, var an tri breur, un n'eus graet e amzar servij var douar, me an daou all zo be var vour. Seizh 'loa en Ocean Indien... Un all a ouzoñ zo be gad e vag e Jeruzalem kar be' zo ur chapeled deut deus Jeruzalem. Henne memes, pugur mamm gouzh a va maro arok ma va deut deus ar servij a zo deut da bo -yaouenk neuze ti e c'hoar 'vit allout labourat e kêr beket ma e be dimeet.

Mamm a zo deut e kêr da vatezh vihen d'an oad a seitek 'loa, en on ti a gômerzh e-kichen ar c'hui, ae va an ti-se, ma p'eus choñj. Plec'h a va ar baraeer Blanchac'h, ae a va ar stal. Setu e be eizh 'loa e ti ar re Gedon, ha 'vit merc'hed var an aod a vei Mari Gedon... Mari ti Gedon a vei 'vit re var an aod. Hag ae e be maro mamm bugale an ti prim awac'h, hag hi 'zo chomet 'vel-just gad ar vamm-gouzh, n'eus graet var o zro ha memestra a n'eus graet var dro ar stal. Setu ae koulz a lavar, n'eus ke kollet ar pezh a noe desket er skoul darpenn hi a chikoure ar vamm-gouzh er stal. Ha pa teue beajourien a vie ae ue da gas choñj d'ar vamm-gouzh pera a failhe er stal. Koulz a lavar n'eus desket on tammig he michar prenif ha gwerzhif en ti-se, hag a vei anveet mat ga' tout an dud var an aod, ga' tout tu' kêr. Or stal kinkailhiri a va, tachoù da lakar er bouteiar ; darpenn mest an ti, mest ar stal a va ferblantour. Ma zad a teue da brenif tachoù da lakar en e voutoù. Ha sur awac'h ar plac'h yaouenk-se a blije deñ, hag a verzhe e dachoù da genelied, en or lavar deo : "Tae, me 'zo be e kêr... t'eus ke im tachoù ? Pugur pa yign en-drofi me 'gemero en-drofi." Setu tad a teue alies-tre da brenif tachoù pugur a verzhe aneo d'ar re all... Va ke droch ane... Ha setu penaos n'eus anveet e vreg.

Tad a va ganet var Poulann... An drae va ue michirourien va'r maez, noe ke... tud dister 'vel ma ve lavert... na vegn ke deus kêrioù. Ta'-kouzh a va michirour va'r maez a laboure 'n or vereuri pe un all. Ae, koulz a lavar an ano Grifon a zo deut deus ar greizenn-se. Be' zo be graet klask ga' maer kouzh Beuzeg, eoñ va Grifon e ano, da velout deus plec'h a teue an ano-se. Hag a va digouet pellig awac'h, an drae nie graet apeupre ta'-kouzh ma za'-kouzh, hag a noe kaet va or Grifon, hag a seblante a va implijet e ti on intron gouzh hag a va deut ae, n'ouzoñ ke penaos, deus an estrenvro. Hag an drae 'va e Meilhar

kouzh ; n'oñ ke be morse... me lavert 'zo be dign ar be-se va stag deus Iliz kouzh Meilhar... bremen pugur e Kofforz ar barez...

Tad noe breur 'bet. Noe nemet c'hoarezed. Teiar c'hoar a noe. Ma mamm gouzh a va be intañvezet yaouenk gad or plac'hig hag a vei dimeet en-drofi neuze gad Ivon Grifon. Ya, setu tad noe on hantar c'hoar goushaf, or c'hoar goushaf deñ neuze, hag un all yaouenkac'h 'vitañ. Setu an drae 'rae teiar c'hoar, me va ke diforc'h ebet... Mamm gouzh a va or Yonkour he ano. Deus tu ar re Yonkour n'am eus ke kemen a anodegezh. Setu tad a va mevel va'r maez 'vel-just, ha pa va deut ar mare da von d'ar servij, na va ken or mousig fall, on taltous, hag an dud a joñje deo va deut gad or breur henañ da denn' ar bilhed. E c'hresk a n'eus graet duveet-tre. Me, 'benn ar blavezh goude noe diskoulmet, kar or c'hreiz-den mat a va, ha mentet mat a va. Setu bla' goude noe ranket don en-drofi ; ha neuze va be mat 'vit ar servij.

Moe nemet daouzek 'loa pa e maro ma zad... Tad 'zo maro deus or c'hañser en e stomok... noe seizh 'loa hag hantar kan. Or c'hreiz-den a va, bleo du ret, me kalz bleo, hag ato a vie o troeif e vez en e vleo... Daoulagad du a noe... re mamm a va sklaerac'h ya, griz-glas... Tad a noe penn bizied karrez ; ha penn e fri a va karrez awac'h ue. E c'hoar yaouenkac'h 'zo be maro yaouenk-tre ; honne 'va ol leanez. Da naontek 'loa vei aet d'ar gouan. Goude 'zo be graet or glanvdiouez dispar deuzouti. E Lille a vei. Me m'eus ke afveet anei. Me choñj am eus pa va deut kelou deus he maro.

Ta'-kouzh, ma za'-kouzh Kemenerhag a va kreñv 'vel on turk, henne noe be an niverenn l ha n'eus ke graet morse tamm servij. Me, neuze an otronij a va pinvidik a gemere un da von e plas o mab... Eoñ 'zo be tri devezh e vêlar ageoñ vie be kemert e plas un bennak, me den va ke

deut da c'houlenn un da ramplas or boc'hij bennak, setu ta'-kouzh n'eus ke morse graet tamm servij. Krefiv-tre a va, pugur alle treuzif hent bras Ploneve gad on hantar bariked gwin etre e zivrec'h. Ha pa va or banne gatañ, pa va dre e vin, a vouie skoeif var e beultrin hag an drae a rae trouz 'vel on tamboulin : "Kroaz Santel, me zo on den !" Setu va chomet an ano avarnañ pa va kouzh : "Kroaz Santel kouzh."

Pa va dimeet ma c'herent, tad a va neuze implijad e ti an dud a rae an trafig tre Kempar ha Douarnenez da von ha da zon. Ni 'va e chom e Tal a' Groaz, ha gad an amzar mamm n'eus kemert an ano Mari Tal a' Groaz. Vie ke lavert dom om ano familh. "Aet ti Mari Tal a' Groaz, ae zo marc'hadourezh vat, ha na po ke kufi deus an arc'han a po dispignet." Evelse nani ve graet brud on ti a gomers. Me m'eus desket lenn ma chifrennoù var ar pakadoù koutilli. Ha goude, kalz duvetac'h 'vel-just, pa m'eus prenet drezoutofñ -ma-un koutilli, kemmet a va an niverenn me me alle lavar d'ar beajour : "O ! me anvez aneo zindan on niverenn all..." Hag a vegn souezhet kar an drae a va kouzh.

Or familh a seizh krowadur om be. Pem a zo deut bras deuzouto, daou 'zo be maro bugeligoù. Me 'va ar yaouenkañ, or c'hac'halanig deuzoutofñ ; na moe ke tamm bet nerzh ar re all evit obar labourioù tenn... Me, memestra, gwel' a rit, e be me ar c'houshañ deuzouto, kar yaouenk ign be maro, koulz a lavar. D'ar skoul, ti ar zeurezed om bet ; da gentañ er skoul-vamm e ti Seur Rose, ha dalc'het am eus ato keneliezed deus ar skoul vihen. Goude, pugur ar zeurezed noe ke otre da obar skoul aboe ar blavezh naontek -kan-tri, e an dimezelled kêr a n'eus graet dign skoul.

Pa e be skarzhet ar zeurezed... Dre ma c'hoarezed 'm eus goueet penaos a va an traoù pa e be skarzhet ar zeurezed deus o zi. Noz-de a vie merc'hed ha gwazed e tiwall aneo. Hag a va or gard, vie kemert an dro 'vel pa vie tu'

klafv en or familh, pep hini a gemere e dro da zon da veilh' an du' klafv. Zirak ti ar zeurezed a va memestra. Ken on de, a va gwelt ar zoudarded o ton da skarzhañ an ti. A fei ! Ar merc'hed 'va ar c'haletañ. Ign 'zo chomet an duveyañ etre an nour da von e ti ar zeurezed hag ar roñseed. Hervez - pugur ma c'hoarezed henañ a va ae e-touez ar merc'hed-se - pa va deut ar zeurezed er-maez, a vegn be kazellet gad ar merc'hed beket an iliz... Hag a noe kaet repu er familhoù da c'hortoz vie kaet on diskoulm.

Pa ofi be-me er skoul, 'vel-just an drae a va duvetac'h pugur ofi ganet er blavezh naontek-kan-daou, 'm eus be skoul surtoud gad an dimezelled ; ha 'm eus graet madig awac'h ma skoul ae. Goude ofi be chomet er gêr... ofi be e teskif broudif ti Tan Agnes, da vroudif var an tul-roued... broudif kouefoù am eus desket neuze e ti ar zeurezed, a va Tan Jermen Ar Bras hag a zeske dom an drae. Tan Jermen Ar Bras a va or plac'h yaouenk kouzh, hag a va tort on tammig... Or vaouez plijus-tre... Goude 'vel-just pa ofi be chomet er gêr, am eus be graet ga' mamm, ga' ma c'hoar henañ surtoud, tro an ti hag er gomers. An eil deus ma c'hoarezed - kollet am eus an eil deus ma c'hoarezed yaouenk-tre... noe nemet daou 'loa varnugen... he c'halon a va klafv hag e be maro trumm, n'am moe nemet nao 'loa. Me, choñj 'm eus, gwel' 'm eus anei e vervel. N'e ke be kuzhet deuzoutofñ maro ma c'hoar. Gwel' am eus lakar anei er serj ha choñj mat am eus deus an intaraman, darpenn, neuze memes ar vugale a rae kañv. Or saro du neve a va graet dign da von d'an intaraman, ha goude evit obar kañv dei er blavezh-se, am eus be or vrouzh du gad on tok du. Choñj mat am eus... Darpenn, p'eus ken choñjel mat, or saro neve vie graet dustu, ha na moe nemet traoù a liou, met ar saro tre e gaot allac'h mon forzh da blec'h deus an amzar-se... P'eus ken choñjel an drae a va er blavezh naoftek kan unnek... A-boan ma va deut lakar or vantel

d'ar merc'hed bihen... A-boan nani va deut ar giz da lakar or vantel d'ar merc'hed bihen... Er goñ noe nemet om saro hag or chal gloan pleget tre daou a vie graet doc'h - var ho peultrin a vie doup - a vie graet doc'h or skoulm a-drefñv. Hag a lakoc'h ho torn zindan ar chal, set' igise na yene ke ho taouarn. Or boned gloan var ho penn, or boutoù koulig en ho treid gad or chosonoù bouret glas ha du, ha tizh d'ar skoul ! Setu penaos a viem gwisket. Or blavezh bennak duvetac'h e deut ar mod da lakar dom or vantel...

Yaouenktre viom lakeet e kouef. Ma c'hoar henañ, matreze n'eus douget kouef da seizh 'loa. Me, pugur a vegn seitek 'loa yaouenkac'h, memestra noe kemmet on tanmig ar mod. Na moe nemet daouzek loa pa e maro ma zad. Hag ae, zo lake' dign kouef da von d'an intaraman. Ha d'ar sul vie lake' dign kouef, me var ar zun, pugur vegn c'hoa er skoul 'va ma bleo 'vel arok. N'e ken pa oñ chomet deus ar skoul am eus lakeet kouef bemdez... Prim avac'h am eus desket lakar ma bonidoù, ha pe mamm pe un deus ma c'hoarezed a fiche dign ar c'houef avarnon 'vel-just. An duveyañ tra 'vie desket da lak' ar c'houef, e obar al lagadenn a-drefñv gad al lasennoù, an drae a va an dra diaesañ, pugur ranker skoulmif en a-drefñv, hep gwelout netra, nemet gad ho pizied a santit pevare a ya mat an traoù.

Pa vam er skoul, pa va deut mare da von d'ar c'hatekiz, a noe di' vech ar zun katekiz, d'ar zadron ha d'al lun da unnek eur, hag a teuiem en-traoñ deus ar skoul da Zantez Elena d'ar c'hatekiz gad an Ao. Person Ofret. Ar botred a teue deus skoul ar frered hag a ranke tremen zirak ar c'hui. Ha d'ar zadron a vie toud al lantiked e verzhiñ al lugumaj... pegemen a garotez 'zo be laeret en or von d'ar c'hatekiz, kaer noe ar frer evezhiañ, un a ziflipe hag un all goude da laerezh karotez pe da mare an avaloù da laerezh on aval. 'Vel-just deut unnek eur 'va kroget an naon enennom ; nign va er skoul aboe eizh

eur deus ar mintin beket unnek eur. Ha goude vie tolet var ar merc'hed e Santez Elena an trojenn deus ar garotezenn pe kalon an aval pa va be chaket mat. An drae a teue var ar merc'hed bep tol goude. An Ao. Person pa vèle an drae... Pet kwech 'm eus ke gwel' ar botred var o daoulin e-kreiz... pugur ar botred va deus an tu diou, ar merc'hed deus an tu klei. Ato vie or pot pe un all e-kreiz var e zaoulin, noe graet on dra bennak. Ar c'hatekiz a va e galleg. Ar merc'hed va'r maez a va ganom er skoul a noe katekiz brezhoneg. Hag e Santez Elena a vam var skabilli 'vel-just. Me or skabell a-ratozh a va vit merc'hed an intronezed. Nign 'va mesk ha mesk, an eil 'kichen eben, me, merc'hed an intronezed 'va deus om voad, a va or skabell a-ratozh evito. Merc'h an notar, merc'h an apotikar, merc'h ar midisin... Darpenn, evitom bugale kêr, ar merc'hed a zouge on tok a va intronezed. Setu merc'hed ar re-se a va "la fille d'une dame" ha nign a va "les filles des femmes". Setu an diforc'h a reyon etreo. Setu merc'hed an intronezed n'azeyen ke e-kichen merc'hed ar maouezed. Ha choñj am eus be bet ga' ma c'hoarezed henañ e bodadegoù al "Ligue catholique patriotique des françaises", hag er zal, o, yaouenkig a vegn, a va da gentañ kadorioù, goude skabilli ; an intronezed ga' tokoù a va var ar c'hadorioù ha merc'hed ga' kouef a va var ar skabilli. Egise a va, met an drae rae ke dom netra.

Evit ar botred a va or c'hlas ive evit ar c'hak -lakichen°... ya be va or c'hlas ispisial, ha matreze e ti ar zeurezed va ive, n'am eus ke choñj, me alle be... Ma breur 'zo bet ato mesket ga' bugale kêr, kemen ga' potred ar vartoloded, kemen gad ar ziked egis ma lavere - an drae 'va potred diva'r maez : ar ziked. Me, kenelied a n'eus bet kemen e-touez potred ar vartoloded, gis kemen e-touez potred diva'r maez. Ha goude, deut da bo-yaouenk, pugur noe kemert ar vichar kalve va'r bagoù, n'eus n'um gaet en -droñ ga' potred ar vartoloded a va akipaj var ar bagoù plec'h a laboure.

Ma breur, goude ma va chomet deus ar skoul, pera noe ? pemzek 'loa, pa e aet da zeskiñ labourat er chanterioù. Pa e deut ar vrezel pavarzek, just a noe ugen 'loa er blavezh-se da zibenn ar bla. Setu 'vel just e aet d'ar vrezel. Siwazh, kalz potred a va deus ar blavezh-se e Douarnenez, me ral e bet ar re 'zo deut en -droñ. Deut 'zo aneo ue 'vel-just, me mac'hufignet ; pe or vrec'h pe or gar. Me ral e ar re 'zo deut diveñgn deus ar vrezel. Eizh miz varnugen e be var ar froñ... er Vendée va aet d'or rejiman er Roche-sur-Yon. Hag ae noe ket allet mon kuit dustu gad ar re all, darpenn noe diblaset e droad, va be pemzete miac'h, hag e be kaset en or rejiman all ga' potred an Norz. Ha n'eus graet toud ar vrezel er rejiman-se gad ar Chtimi. Hag a va deut da gomz evelto. Ha pa e bet gloazet er blavezh seitek, pa e deut da Bariz, en ospital plec'h a va, ar c'hlañvdiourezed a va ae, a joñje deo va or pot deus an Norz pugur a noe kemert o fouez-mouezh da gomz gato. Me, Breizhiz a va gatañ ue. Dreist-hoil a va un deus Gwengat - ar po' paoul, be e be laet - henne noe dalc'het da gomz galleg gad e bouez-mouezh breizhat, setu potred var-dro Pariz a rae ar sot deuzoutañ. Hag eoñ n'halle ke respon, darpenn a va on tammig berr var e deod, a vouie chouel : "Jos, Jos, deus buen 'tañ da zifenn ac'hanoñ, 'megn adarre kroget ganign !..." Ar re all na gomprenen ke pera a lavare, setu a teue Jos kea, setu 'veljust hemen a va distagallet, ha vien kaset da sutal.

Eizh miz varnugen e be var ar froñ nes beañ be morse gloazet. Graet n'eus Verdun, l'Argonne ha be e be gloazet er Somme, e Mae er blavezh seitek gad Nivelles, a noe kaset aneo hep beañ bombardet arok. Noe ke kaset tamm

° Krak-lakichen 'zo potred-mevelienn-an intronezed, duvetac'h ar c'hrak-lak a va or michirour.

tolioù kanol, hag ar re-men a ranke mon... an drae va be spontus ! Gout a raofñ Nivelles n'eus kaet da lavar goude : "Qu'est-ce que j'en ai consommé de Bretons." An drae 'va bet ol lazherezh spontus ! Ae e be gloazet ha kaset da Bariz. Ha noe ke kemert morse galoñs ebet. Na falle ke deñ. Darpenn pa teuen nebeut divar an dachenn, pugur eoñ va boazet, pugur va dija un kouzh pa teue ar re yaouenk, peurliesañ a gemere penn ar golonenn da gas aneo var a-dreñv ; a-vechoù vien kollet, ouien ke re palec'h a vegn, chomet distaget deus ar re all... Setu alies 'zo be kinniget deñ galoñsoù : n'eus ket fallet deñ morse. Met obar var-dro ar re all ma vegn ke ken gouizieg hag eoñ a rae. E gapiten, hag a va or breuteur deus Pariz a noe kinniget deñ, pugur a anveye ane mat, noe lavert deñ, ma-kar vie bet e ordonañs. "Je veux bien être soldat, mon capitaine, mais jamais vous ne ferez de moi un domestique" noe respontet.

Setu pa va be gloazet, e be kaset da Bariz d'an ospital, hag e be bla ae, e vrec'h va be gwall gloazet, ha mat va deut. Me, goude afar Nivelles, va kroget on tammig ar rejimanchoù da m'in reveulzi. Hag e rejiman-deñ noe nac'het mon en-droñ en trancheoù... Pùgur va be ken roué ar re va deut en-droñ. Eoñ 'va neuze en ospital. Setu eoñ er "service auxiliaire" kaset da Vourdel ; ae n'eus desket blegniñ ar c'hirri. Hag an de goude an armistis, er blavezh trivac'h n'eus graet parti deus or "mission antibolchévique". Seizh kan a noe ambarket e Brest an de goude an armistis. O, or veaj kaer a noe graet... Evit mon da vro Rusi. Setu noe treuzet ar mour Atlantel beket New-York, treuzet an Amerik beket San-Fransisko, treuzet ar mour Habask, chomet a-sav on devezh pe or penn-devezh en Honolulu, tremenet tre ar Japan da zibarkif e Vladivostok. Du-se e bet en or c'hamp, n'eus ke morse tennet tol fuzuilh ebet... voar ke pera e bet e obar du-se evel soudard ! Ar veaj n'eus padet bla. Setu ign e Vladivostok en erc'h hag



er skorn. Dilhed kroc'hen a va gato... Deus Vladivostok ign be kaset 'kichen Pekifñ, setu ign e Tin-Sin, hag ign bet ae or miz bennak. Tro ar bed noe graet, pugur goude ign deut tre Ceylan d'ar gêr, tre ar mour Ru, da zon neuze e Marseille. Ae e chomet klañv, pugur a va be pourmenet deus ar skorn d'an heol tomm, a va chomet klañv. Soudard a va ato. Setu e deut d'ar gêr var-lerc'h re e oad, me, n'eus ke komprenet morse pera 'n'eus graet, kea ! Setu n'eus kemert en-droñ e vichar kalve.

Matreze da veañ heñval deus e da'-kouzh, pugur ta'-kouzh va kalve va'r maez... Ia... Toñtoñ Jos... Eoñ a lavare da Morwena or wech : "Deut ganign 'tañ Morwena da bourmen, du-se 'zo traoù brao, mergodenned brao, deut ganign beket..." "Chilawet Toñtoñ Jos, du-se 'kichen ar mergodenned 'zo traoù ue evit an otronij, aet da vèlar 'tañ ageoñ ar re-se a blij doc'h..." Hi falle ke dei mon gatañ, ha vit kawet peuc'h, eoñ noe ken mon, ue, da velar du-se...

Labouret a n'eus ue e San Malo var ar bagoù a yeye d'ar beskerezh moru. Goude ue, 'zo be kemm er bagoù... Vien ke mi ga' lienn, zo be ranket lakar kefuserien avarno, setu an drae, d'ar charpantourien, noe graet labour. Me labour tenn a va. An drae va bagoù graet meur a vlavezh a va, setu ranken obar an drae en aod, fi voar, pa vie ijel ar mour. Setu 'm eus be gwel' ane ue mon da nav-or deus an nouz da labourat gad leternoù evit achuiñ arok ma vie be deut ar mour en-droñ el lae, petraman an dour a vie bet aet er vag.

Nign va just e chom, fi voar palec'h ma ar patisar T... - bremen 'veljust M... n'eus digoret an drae penn da benn - ar stal an tostañ deus ti ar patisar. Ae om tout ganet. An ti va neve, va e ton deus beañ saet, pa e aet mamm e-barzh er blavezh trivac'h kan pavar ha pavar ugen. Hi e bet ar c'hentañ fermour 'zo bet e-barzh. Darpenn va

ket achu tre memes, be va c'hoa munuzerien en ti. Ha goude neuze, er blavezh naontek kan unnek, pugur va lavert da mamm neuze e sekret, M... a va e soñj digorifi or stal ae en he flas ha lavar dei mon kuit... Setu just er c'horn aman a va hemen da verzhifñ, setu n'eus prenet... Aman a va or c'higar, ha plec'h ma antron K... va or baraer ; setu ar re-se na va ke gollo ar stal, ranke mamm gotoz vien be aet kuit, achu gato o amzar evit don e-barzh. Ha dustu M... a noe kaset an uchar da skarzhiñ kuit dustu. 'Va nao 'loa varnugen 'zo 'va mamm en ti e chom... Pa n'eus goueet noe prenet aman, n'eus kaset an uchar dustu. D'ar seizh-varnugen e be prenet an ti, 'benn an nao-varnugen va an uchar en ti. Da lakar ac'hanom e-maez, pugur toud ar familh 'ranke mon e-maez 'vit miz Gwengolo. Ha na va ke dieub an ti aman. Setu, an eil deus ma c'hoarezed noe or c'hleñve' kalon. 'Veljust toud ar familh 'va be spontet... penaos obar, penaos... Ha noe bet or stokadenn var an drae, hag e maro, ga' doare an uchar-se. Fi voar, hi-zé, an drae noe graet dei ol lamm kalon re greñ, noe bet or stokadenn, hag e maro div-or goude ar stokadenn. Be noe be c'hoa stokadennoù, me 'boe pell noe ke bet. Met an drae va evelse, pe or jagrin, pe on dra bennak diaes, an drae va avac'h 'vit obar d'ar galon... Or rogadenn hervez ar mod noe en he c'halon... Ha deus an amzar-se va tra da obar. Noe ken daou 'loa varnugen anei. Setu an drae noe graet tou tro kêr. Setu ign a m'in gaye on tammig en o bouthoù bihen. Ha M... a va e ti L... ae ; eoñ 'va mevel bras ma p'eus c'hoan e ti an apotikar... Setu an Ao.L... noe lavert deñ : "Ha setu fi en or zoubenn vrao. Gouskoude a vouioe'h ar plac'h-yaouenk-se a noe or galon klañv pugur vie kemert dei louzeiar aman pa noe stokadennoù..." Ha nign n'eus be goueet an drae darpenn, or c'heniel da Jos a va mevel bihen ae, hag eoñ noe klevet ar goz etre L... ha M... An Otrou L... neuze o c'houdrouz e vevel bras. Setu fi voar, ar mevel bihen a



chilowe... Henne 'va or pot Ploare 'va deut da vevel bihen  
ae. Hag ar pot-se ue, yeye ke d'ar gêr bemde, a noe or  
grām e kêr, ha bemnouz a teue d'om zi, var-lerc'h koan.  
Setu deus an nouz en om zi - va ken ol lamp, or c'hleuzeur  
ga' petrol - un deus ar merc'hed peurliesañ a lenne a vouezh  
uhel hag ar re all a rae stamm toud en-droñ d'an daol...  
Ha kamaraded all a teue ue. Va ke bras ar gegin, met a-  
vechoù vie leun egise, un azeet var or gador, un all azeet  
var or c'hes... A-vechoù vie kan ; kan bras deus an nouz.  
Me 'va ar bidoc'hig, neuze, a-vechoù moe c'hoan kousket,  
vien laket buen em gwele, evit kowet peuc'h deuzoutofñ  
michañs, kea... Mamm a noe be pavar 'loa skoul, n'eus  
lennet ato kalz. Ha goude pa e deut Breizh-Ato, R. Hemon  
a rae kentelioù var B.A., doare an otru Penlereg, ha mamm  
a lenne an drae aketus-tre, darpenn lenn a rae mat-tre  
brezhoneg. Ha me 'm eus desket lenn brezhoneg... Komz a  
raen ane ; kompren a raen ane mat-tre pugur deus an amzar  
-se, fi voar, toud ar gōmers vie graet e brezhoneg. Nign  
etrezom a gomze ato galleg. Me gad an dud er stal 'vie  
ato brezhoneg. Ha ta'-kouzh pa yeyen da bourmen gatañ...  
Ta'-kouzh na vouie ket or qer gallek. P'eus ken choñjel,  
ta'-kouzh nie be miac'h 'vi kan-hantar-c'han 'loa bremen,  
me m'in gleout a reyom mat om daou memestra. ... Setu eofñ  
nani noe kontet dom neuze, ar goz noe klevet etre an daou.  
Mamm noe ranket goul gato loskar anei daou 'loa c'hoa en ti.  
Daou 'loa noe im, darpenn ar c'higar a yeye kuit. Setu ae  
noe asantet.

Er memes ti ganom a va e chom, an tad Bazin a  
laverom deuzoutañ, an drae 'va e ano gwir. Intañv a va,  
daou vab a noe, va deut dija da botred yaouenk hag a vegn  
er Marine Nationale. Setu e kêr va on intron gozh hag a  
veve hec'h unan. Pinvidik a vei. Bev' a rae mat-tre deus  
he leve ha deus he refchoù. An tad Bazin a anveye mat anei,  
ha deus on dra d'on dra all a va deut da vevel d'he zi.

Na va plac'h ebet, hag eofñ a m'in emelle ha deus an tiegezh  
ha deus an intron. Kouzhig a vei, setu 'veljust ranke  
beañ chikouret da veañ gwisket, diwisket, me mat-tre a va  
he spered, lemm a va he spered hag he zeot ive. Ap drae  
noe padet bla, daou 'loa matreze, me memestra an drae a  
rae skandal e kêr. Setu an Otrou Person a va deut da vël  
an intron ha da laver dei na va ke dereat evit or vaouez  
kowet on den 'vel implijad, nie kaet kemese or vaouez da  
zon da blac'h gati, a nie graet kenkoulz var-dro an ti ha  
var-dro ar vestrez. An intron a respon d'an Otrou Person :  
"Chilowet O. Person, fi a p'eus or garabasenn, na p'eus  
implijad ebet ha n'oc'h nemet gwazed er prospital. A-beñ,  
an de a gemeroc'h or servijar, me a gemero or vaouez da  
m'in emellif deuzoutofñ."

'Vel-just an drae na va ke gwelet mat ga' familh  
an intron, darpenn an implijad-se a gemere kalz perzh var  
an intron gouzh, ha darpenn d'an eritaj, na va ke gwelet  
mat tamm ebet. Meur a vlavezh goude e maro an intron gouzh.  
Setu 'vel just pa e deut an eritourien en ti, va be sklapet  
Bazin e-maez. Hag eofñ a youc'he var ar riblenn : "Tolet dign  
ma boutoù-nizoù ! Ma boutoù-nizoù a 'm eus im !" Tolet vegn  
be deñ tre ar prenest. Hag on dra vat a noe graet. Er voutez  
-se a va kuzhet an testaman en e gefivar deñ. Ar familh n'eus  
kaset an drae zirak al lez-varn met na n'eus ke be tra da  
obrar. Graet mat a va an testaman ; a va dija meur a vlavezh  
arok ma va aet an intron divalo a va graet an testaman. Ha  
brao-tre an tad Bazin a n'eus bet toud an eritaj. 'Vel just  
goude a va deut en-droñ en e diegezh. An de ma douche e  
interestoù, a yeye meo on tammig, me kalon vat a noe ha toud  
ar vugale a va e chom en ti a vie prenet deo madigoù er  
patisiri en om c'hichen, e ti an intron Stefañ.

'Vel just a va kalz bugale en ti, ha deus ar  
mare-se na va nemet or grām 'tre pep familh. An huni a noe  
krām ha kegin va dija tud en o aes. An de ma e maro an tad

Bazin, va dirollet or guron spontus var Douarnenez, giz e bord ar mour na ve ke gwel' alies. Setu an amezeien, ar re va en trede estaj e chom a va deut en traoñ spontet : "Ma, sur avac'h e an tad Bazin a zo aet d'an ifern, hag e deut an ifern var an douar."

Deut a va tud all en ti da chom, darpenn meur a familh a va. Pa vie or grām bras avac'h, a servije da grām kousket, da gegin ha da sal-dribiñ. Ma vie gwele an tad hag ar vamm deus on tu, peurliesañ a vie or gwele daou estaj 'vit ar vugale, a va lojet daou bugel el lae, daou bugel all en-traoñ. Ha 'va ke ral an tired plec'h a va er memes penn daou gwele a zaou estaj. Or stal-zour a va 'vit lakar ar brokoù hag al listri 'vit ar gegin, ha neuze da zispên ar pout-houarnoù hag an traoù all. Met ar planchot a vie ato ken gwenn, a pie allet dribiñ avarnañ.

Arok ar vrezel pavarzek ae, na vie ke sarret morse ar stalioù deus ar zul. O, morse ! Ar stal vie ato digor d'ar zul. Pugur a vie ato digor ar stal d'ar zul, tad a yeye da bourmen ac'hanom. Hag ato viom kaset tre Kerlouarneg, tre ar Pinit, a reom toud an dro evelse var ar maez. Ha ma geje gad un bennak en on hen treuz, ato a lavere or ger bennak d'an dud a dremene en om c'hichen, petraman a zae e dok. Setu nign a vouie goul gatañ : "Tad, fi anavez an otru-se ?" "Tad, fi anavez ar vauez-se ?..." "Nann, ne ke darpenn a anveof aneo, me ve ke kejet egise gad an dud var on hen, enes lavar deo or ger bennak, petraman saludiñ aneo. Va'r maez 've graet egise." Nign a gaye drol a anveye kemen a dud va'r maez. Ha mamm a lavere dom ato : "Bugale, graet ar vad ato pa alloc'h, an drouk a raoc'h pa garoc'h..." Ha ma viom ke chentil gad un bennak, ni vie goudrouzet start. Me, mamm e a rene en ti. Pa vie cholori tre ar merc'hed hag ar mab, tad vouie lavar : "Mari, deus da lakar refik avarno..." Ha pa teue mamm var bord an nour, flip, pep hini va en e blas, 'va ke mi tra da laver.

Ha deus ar zul vintin a vie gwerzhet kalz traoù, darpenn, neuze an dud a laboure d'ar zadron duveet avac'h a-vechoù, surtout pa va ar mia 'labour er friturioù. Setu d'ar zul, lakom an drae e dibenn miz Gwengolo, miz Here, a va ar mare da verzhiñ ar bouteiar. Setu d'ar zul vintin seurt choñsonoù : choñsonoù bouret, a re zu, petraman a re glas ha du, a va e-barzh gloan gwenn. Petraman, choñsoniear Sigovi, an drae 'va or mezar du, kalet avac'h... Kasketennoù martoloded ue vie gwerzhet en ti. Setu d'ar zul vintin neuze a vie reuz evit preniñ or gasketenn pe or botoù. Ar vartoloded deus an amzar-se a noe or gasketenn plad var o fenn, glas-mok, me pell goude nani er deut da lakar or vizieren 'vel ar vartoloded kōmers, goude ar vrezel pavarzek, paz arok... O, ya, meur a re voutoù vie gwerzhet evelse deus ar zul vintin. Gwerzhet 'm eus c'hoa 'vel just goude ar vrezel bouteiar seulioù koad, be va seulioù koad kraon, hag an divar gorre 'va laer... Vie lavert deus ar re-se or sokoù pe or botoù-soulie-sabo, gwel a rit, soulie a va an divar gorre, hag ar voutez a-zindan...

Mamm 'vie bep zul en overn féc'h-or e Santez Elena ha me joñj dign memes en hafv a vie en overn pem-or. Ha goude vie digoret ar stal. Ha neuze ae vie fichet toud ar vugale da von 'vit an overn-bred. Toud an dud a va prest, laket ar c'houefoù, laket ar mouchouiroù. Ar vugale va toud var skabilli a-dreñv an otar vras, ar botred deus on tu, ar merc'hed deus on tu all.

Kalzig kōmers vie graet neuze e Douarnenez, pugur va ke kalz stalioù va'r maez, va ken ostalirioù. Me 'm eu' choñj pa vegn er skoul, deus al leun, pugur al leun 'va devezh ar marc'had, pa teuen da bidivor deus ar skoul, a vie mamm e renkiñ ar pakadoù gloan a va e kosadoù, ha setu pa teuen deus ar skoul, mamm nie ket achu c'hoa renkiñ ar gloan a va be dispac'het... Nie ket achu al labour-se c'hoa da

bidivor. Nann... kalz kōmers vie graet, ha 'vie gwerzhet a bep sort : gloan, hernaj, ispisiri, trebioù a va ganom, koutilli, goulou rouzig... Deus ar mare-se ue a va suk rouz ha suk gwenn. Ar suk rouz a va e barikenoù bras ae, hag henne 'va mat ! An drae rae pouloudrennoù - pouloudrennoù zo tammoù bihen, fi voar, deut kalet, ae - me vouie lipat deus an drae, an drae rae just doc'h or madig. Ha neuze gad or mailh hag or gizell yen a vie torret. Setu an tammoù na vegn ke tamm bet deus ar memes ment. Me, choñj am eus da veañ torret suk... N'ouzoñ ket hageoñ rae ke pem kilo... Ya dreue obar. An drae rae e-giz or vigoudenn var ar penn. Ha goude e deut ar suk troc'het gad or mekanik ha reñket er vouest. Setu an dud a brene or c'hilo, pe on hantar lur... Ma mabig paoul !... Daou venneged gloan da basedennif ! Or met padoù, huni du, huni glas... Darpenn, ar botred ma va drebet âman bordenn ar chupenn a vie laket padoù, gwriet padoù penn-dabenn, e-giz bordenn ar milgin ue a vie laket padoù. Setu vie ke morse pilhaouet an traoù pugur vie laket padoù. Hag an drae vie gwerzhet d'ar met. Ha neuze var an daol plec'h a vie servijet an traoù, a va or c'hoch ae, an drae rae or met, an drae or met hantar. Hag e penn an daol-se neuze a va or vilin da valif ar c'hafe. Darpenn ar c'hafe a vie gwerzhet toud malet... O, ya ! 'vit daou venneged traoù vie gwerzhet, krowadur ! Ha, va ke bras ar gōnit ; choñj am eus klevout mamm e lavert var ol lur gloan a c'honeye pem kweneg. Lakom a vije bet da lakar or jilet gloan d'on den, a yeye ol lur pe matreze div, teiar bellen miac'h hervez ment an den, a-beñ var al lur a c'honeye pem kweneg ; me ae, ranked obar adoziou var ar briz. Ha 'vit gwerzhiñ or c'hased chikore a chome gati pavar gwenneg hag or c'hes gollo. Gwel' a rit, ar gōnit na va ke bras. 'Vel just na va ke tailhoù 'vel a zo bremen. Memestra, gwel' a rit, ar gōmers âman e ar mab bihen 'zo chomet... Me, da viz mae kentañ a vo daouzek 'loa ha pavar-ugen e digoret ar stal.



35

DOUARNÉZ. — Le Lavoir de Port-Lanouen et l'Île Tristan. N.D. Phot.

Al lenn aman zo ru du Mol... Fi vel ar botred vihen ae gad o buruzennoù, ar bugel ae gad e voutoù-koad en e dreid. Hag ar plac'hig-men n'eus poan den sur! Va lakeet dei ouet hag or mouchouar... Set 'ae ar merc'hed gad o mouchouiroù bihen... Ae vie pres e verc'hiñ! Set amen or vauez gad or chiletenn, homen 'zo or vauez diva 'r maez: fi vel ar voulouz var he c'hegn? Ar merc'hed bihen vie or saro gato... Ae va bec'h da verc'hiñ!... Ae dreue mon eizh a bep tu; fi vel ae zo or c'hachet gollo ...

Ha pa teu dign choñj deus ar polichen ue, a teu dign choñj deus Toñtoñ Loul, henne 'va or polis kouzh. O, neuze 'vegn c'hoa krowadur, or grennardez vihen, ha Toñtoñ Loul a va or polis neuze, hag a noe or pezh mell baroenn hir... O, me, gase ke kalzig a dud d'an toull... Choñj am eus deuzoutañ, pugur nign a va just ae fas da Garn an Tachar - Karn an Tachar, ha n'ouzi ke perak a vei Karn an Tachar ? An hentig a ya ae a-drefiv an otel de Frañs... Ta'-kouzh Grifon Janed Kerivel a va tachar kezeg, hag âman plec'h 'ma T.D.K., ae va on our vras, ae va or pezh mell porzh bras hag a rae var ar Garonn en a-drefiv. Ha pugur a va tachar kezeg, an drae 'va Karn an Tachar. Me, Toñtoñ Loul pa vèle un bennak meo, ha pugur a anveye tout tud Douarnenez, e-lec'h kas ane d'an toull, Toñtoñ Loul a gemere ane tre ar vrec'h hag a gase ane er straed treuz ae : "Kerzh d'ar gêr ! Kerzh d'ar gêr, jomes ket ae ! Mag a teu un all ae, te vo kaset d'an toull ! Kerzh d'ar gêr, laverof dit !"

Ha pa vegn krowadur, ha pa va brao an amzar, a-vechoù ga' merc'hed a va ganign er skoul a yeyem deus koste Plomac'h, d'ar Gored... Met ae va diaes diskenn ; ae va ken on hentig bihen ha me vegn ke re vliv da lammar var ar c'herreg egise. Met an aod plec'h a vem an aliesañ - nign noe ke "costume de bain" - nign a noe or saro lous neuze, a vie laket or spilhen-magerez etre an diviskar 'vit sarrif ane... Setu ae alloc'h obar soubif, n'eo ke nuf, soubif beket o koug... Hag e aod an dimezelled - an aodig -se 'va 'vit an dud cheuc'haf, darpenn e Porzh-Kad, ha kouskoude n'e ke pell, e kalz grosac'h an traezh - met e aod an dimezelled neuze ue vie toud boc'hichen kêr. An intronezed a teue kea, fichet toud, gad or gador deus o brec'h, hag an disheolerez. Darpenn, neuze va ket ar mod da zon kroc'hen rouz doc'h 'vel or morian fi voar, neuze va dao dalc'hen ar groc'hen gwenn ha roz. Ha bremen miac'h

morian oc'h pa e echu an hañv ne ken kaerac'h. Ae, penn -a-benn ar vougar neuze, a va kabanennoù bihen darpenn' an otelioù a noe pep hini e gabanenn, setu o fratikoù vie graet deo an alve, setu o fratikoù alle mon ae da m'in ziviskif. Deus an amzar-se neuze, fi voar, merc'hed kêr na yeyen ke kalz d'an aod. Peurliesafi toud ar mammoù a laboure ; setu ar vugale a vie fiet an eil d'egile. En or familh ma va un daouzek pe trizek 'loa a va tri pe bevar bien gati deus ar breudeur bihen, pe on amezegez. Met ar vugale a m'in evezhie an eil egile. Ma goueye un bihen en dour, sur a vie be tennet e-maez tre ar blev pe tre an treid, me 'm eus ke gwel morse gour ebet deuzouto da veañ beuzet. Ae 'va ket otre da nuf 'met gad or "maillot". Moused bihen Douarnenez fi voar o doe tamm "kostume de bain". Don a rae ar polis el lae var an hen, hag ae 'va on diriou kouzh ga' megn da ziskenn, hag a va or venn e-kichen an diriou-se, hag e-kichen ar venn-se a teue ato or polis, Toftoñ Loul pe un all... Be' va un all 'm eus choñj va Gabriel ar Polis, me henne va on tamm beg sec'h. Henne a teue neuze, gad e varvichenn hir, a-drefiv ar venn-se ; toud bugale Douarnenez a vouie ae nani vie evezhiet. Setu e-kreiz an abardae a vêlor ar moused bihen o sevel o fri : "Oy ! Ar polis 'zo ae !" Setu ar botred a ziskrape neuze e-touez ar c'herreg, ha pa vie un ae var pep karregenn, hag ign a m'in dole er mour, hag a ziflipen en-droñ er reier neuze... Me, pa vouie mat ar botred nuf, neuze a va redadeg. A va neuze mon deus aod an Dimezelled deus ar penn an tu klei beket aod Porzh-Kad ha don en-droñ. Pe neuze, brasac'h, mon d'ar Flimioù. Met ae neuze, a-vechoù a glevoc'h : "Chikour, Chikour !" ha vie ke gwir alies. Or vech am eus gwel on otrou e von en arj, pugur an otrou -se a noe m'in zivisket, ha setu 'va or c'hoarzhadenn... Ha noe paket or roustadenn pa va deut var an traezh. Bugale ar Gerlosket a vie alies ae. Hag a teue ue or vaouez gad e

baner gwastilli da verzhif gwastilli d'an dud a va ae en aod. Setu an dud cheuc'h a brene. Or vech, va saet on tammig chikan etre potred vihen Douarnenez ha "les petits monsieurs". Setu ar re-se noe or gabanenn... Pa vegn deut d'ar gabanenn da m'in viskif a va deut potred vihen kêr âman, ha kemert traezh ha tolet dreist an our er gabanenn, setu va koueet toud an traezh avarno. Un deuzouto 'va deut e-maez, a noe strilhet or plac'hig, honne noe paket, a noe strilhet anei. Ma pie gwel ar re all e ton def... Va be kann vras en traezh neuze kea, e m'in vatif gad an traezh, eneb enne fi voar !

Nign a c'hoarie gad or gordenn, fi voar, fi da lammar e-barzh ; an drae a va ar c'hoari goñ. C'hoari bolloten ue, deus 'ar vougar...

Alies a va pollotennoù graet ga' gloan start, a vie brodet ga' tresadennoù. C'hoari bilhabantoù gad askorn loe, tolet un en aer ha paket un, tolet un ha paket on eil...

Alies a pie or vergodenn e-giz prezan, gad or penn porselen. Be vie ue c'hoari mon da guzhat, c'hoari koukou. Pa vier var ar ru, pa m'in gayor er ru, potred ha merc'hed deus ar memes oad a c'hoarie a-gevret. Ar botred neuze a m'in c'hoarie an eil deus egile. Ar vugale a c'hoarie alies er ru. Hag an dud vras en hañv a zegase or gador, hag a vie drebet or zoubenn e-kichen our an aître, ha goude vie graet stamm, hag ar vugale vie e chouel hag e c'hoari. E-pad ar vakansoù, yeye ar vugale var an aod da basketa, da c'hoari er c'hanojoù bihen, ha me voar me...

II

AR VUHEZ E DOUARNENEZ.

Pa ign dimeet, mamm dustu n'eus be digoret, ar bla dustu e dimeet hag an drae 'va er bla trivac'h kan pavar ha pavarugen, n'eus be digoret ar gōmers e Tal a' Groaz. 'Vel just or gōmers 'vel tout kōmersoù neuze a vie ispisiri, gloan, bouteiar, hernaj, pout-houarnoù bras, ar re vihanac'h, ar pout-houarnoù brasañ-toud a vie gwerzhed da von va'r maez da boaat boued d'ar moc'h, d'al loened, pe d'ar vartoloded da obar koue. Ha 'vel just, ar re vihen evit an tiegezhioù. Gwerzhed vie ue chadennoù da stag' ar zaout. On tammig a bep sort. Neuze na va ke kemen a stalioù e kêr, ha surtoud na va ke stalioù er borc'hadennoù diva'r maez. Setu a vie kalz, kalz tud diva'r maez e Douarnenez d'obara o marc'had. Darpenn neuze a vie foarioù : plasenn ar moc'h na va ke pell deus om zi, ha choñj am eus krowadur be' var an aod e welar tu' Kraon deut da brenif moc'h bihen e Douarnenez, e sammif moc'h bihen deus ar c'hae da lakar er vag da von da Graon ; a vie ar moc'h bihen e vleñjif. Gwel' a raof c'hoa, kemert tre an divskouarn ha tre al lost... Gist en hañv ue, pa va mare ar sivi, a teue or vag deus Plougastel da verzhiñ sivi da Zouarnenez. Hag a teue un, Toñtoñ Lui, ( un deus om amezeien a lavare deuzoutañ Toñtoñ Lui Reor Flastret, darpenn e otou 'seblante ato beañ re vras evintañ, setu vie ke gwel ar feskennoù, setu a va Toñtoñ Lui Reor Flastret.) Henne a teue e-pad mare ar sivi hag a teue d'an ostaliri Breizh e-fas d'om zi

hag a jome ae e-pad or miz, daou viz, 'vel ma vie im. Pa vie gwel Toñtoñ Lui e ton, a vuïom va or vag e ton ga sivi, hag a verzhe neuze da merc'hed Douarnenez da von da verzhiñ var ar marc'hajoù, tro-kêr. Setu en om zi vie prenet or vannikenn, a vie rannet ar vannikenn neuze etre an amezeien. A vie prenet or vannikenn etre tud an ti. An drae rae doc'h, div lur, teiar lur, pidir lur sivi hervez ma va bras ar vannikenn.

Gist ma 'm eus choñj ue e vèlar ar chasourien o ton gad on hoc'h-goue ae d'an ostaliri-se var lerc'h ar chase. Darpenn e Douarnenez a va e ti ar Chafserelled chas ha kezeg da von d'ar chase. Hag a teue chasourien all gato evit mon da Goad Nevet. Gwel' a raof c'hoa ar rofseed o tremen, hag un deus ar wazed noe on trompil, hag ar re all neuze e talc'hen ar chas. Hag an drae 'zo chomet em dolagad, sklaer, o vèlar toud an dud-se o von kuit. Ha deus an nouz a vèlen aneo e ton, neuze. Setu ae nani va an emgav en ostaliri-se, hag an disparti 'vel just deus an nouz.

'Vel just Douarnenez na va ke pinvidik pa n'eus kroget mamm gad he c'hōmers. Neuze na va ke tamm bet memestra 'vi martoloded Douarnenez. A vie peskerezh en hañv, me, er goñ vie ke kalzig a dra da obar. Setu ar gwennijen a va be lakeet a-goste en hañv a deuze buen goude er goñ. Ha merc'hed Douarnenez a gare, a n'eus karet ato an traoù kaer hag an traoù brao ; setu en hañv pa vie gwennijen fonnus a vie prenet lionaj kaer : manteletol, chalioù brodet, mes er goñ, pa va treut ar geusteuren vien gwerzhed en-droñ. Ha va merc'hed a rae ar vichar da von da ginnig en tired ar pezh a vie gwerzhed. Hag un deuzouto a va anveet mat, a vie lavert deuzouti Anetig Kakac'h. 'Vel just, an dud a vie e kōmers a vie goulet gato obar termen. Kalz tud onest a va hag a bête pa allen, pa noe gwennijen, me truchenned a va ue, vie ato e klemm me, na

bêyen morse. Pa e be gwelleet ar gwennijen e-touez an dud, kalz tud hag a failhe arc'han da mamm a zo deut brav tre da bêyif o dle, me ar re all n'ign be gwelet morse.


En om zi a va or baraer e chom, hag ar forn a va er porzh. Deus an amzar-se a vie tommet ar forn ga koad, ga fagot pe ga lann sec'h. On neo a va ue en ti forn evit labourat an toazh. Deus an nouz a vie graet ar gwell ha laket or zac'h avarnañ evit dalc'hen ane tomm. Var dro divor pe devor, hervez al labour a va da obar, a zave ar barad d'obar an toazh. Deus an amzar-se an toazh a vie fustet gad an divrec'h. Be' va baraerien a rae lakom or fornad bemde, div, teiar hervez ar pratikoù ma noe. Peurliesañ ue a noe or mevel da chikour ane darpenn n'alle ke pouezif ar bara, lakar ane var reñk, ha neuze da lakar ane er forn a ranker kowet chikour. Setu e-pad ma vie ar fornad bara e poazhiñ, ar vistri-baraerien a yeye da gemar or banne en ostaliri. Darpenn e kreiz kêr a va matreze daou pe dri ostaliri hag a zigore da bidivor deus ar mintin. 'Vel just ar re a gave re vat blaz an odivi a vie hantar veo hag alies a zizofjen 'va deut an eur da von da dennif ar bara deus ar forn. Pa teuen, a va devet ar bara. Met ar pratikoù a va difisil, setu a yeyen d'on ti all da brenif bara. Ha meur a huni deus ar varaerien zo aet en doufez darpenn d'an drae. Goude vie skarzhet leurenn ar forn, a vie lakeet al ludu hag ar glaou bihen en or c'houfr houarn 'vit obar def lazhiñ. Hag al ludu-se a yeye en-droñ va'r maez, vie gwerzhed da botred va'r maez evit tolar var an douar. Hag al ludu-se ue a zervije pa vie graet koue va'r maez e bailhoù bras. Deus an amzar-se a vie graet divech ar bla koue va'r maez. Setu perak a vie kalz leanaj en arbilli. Ha 'vel just an dilhad lous a vie digraset el lenn ha lakeet en or bailh bras. Var gorre al lianchoù a va er bailh a vie lakeet, en or zac'hig ledet avarno, ludu ha var al ludu-se - hervez ar mod memes ma vie lakeet

on tammig ili deus ar c'hig-sall var al ludu ha tolet dour berv, a teue gwennac'h al liserioù. Meur a vech vie tolet dour berv hag an dour vie dispeñnet zindan ar bailh da lakar en-droñ var an tan. An drae a bade meur a eurvezh. Setu vie ke kollet netra ; memes al ludu vie implijet. Evit merc'hed kêr, 'vit gwec'hiñ an dilhad fank, na va ke memestra ; a yeyen d'al lenn. Alies or panar bec'h var o fenn, a vie graet or ron gad on torch, lakeet var ar penn, var klipenn ar penn ha lakeet ar panar, hag an divrec'h var ar c'hoste, hag a yeyen evelse sonn beket al lenn, gad ar panar dilhad fank. Lenn Plomac'h a va - al lenn vras 'vel ma ve lavert - pe Kerc'haro. E Kerc'haro a va pidir lenn ; e Por Ru a va unan all ; e Kermaron a va ue. Ha setu ae vie gwec'het an traoù, a vien lakeet da virviñ, a va on tammig lochenn. Pe en dey all ma na vien ke bervet, a vien ledet var ar geot e-kichen al lenn zindan an heol ha glibet a bep mare, hag a teuen gwenn kann. Ha pa vien tennet deus an dour fresk goude, vien fustet gad or golvez evit tennif mat an dour deuzouto. Ha goude vien lakeet var ar c'harzh - mag a va lennoù Kerc'haro lakom, ae 'va plas da lakar aneo var ar c'harzh da zec'hiñ. A vie fez vat gad an traoù fresk-se ! Vie fez ar glachenn... Ha lakeet en-droñ er panar bec'h ha lakeet en-droñ var ar penn da zon d'ar gêr. 'Vel just pa vie kaer an amzar, 'va ke diaes sec'h' aneo evelse, me pa va glav a vie diaes avac'h, ranker gortoz vie deut or gaeradenn da von buan ha buan, da lakar aneo da zec'hiñ. Me, pa yeye ar merc'hed deus ar mintin d'al lenn, lakom a yeyen da Gerc'haro pe da Germaron, en diavez deus kêr, da greiste a nie nemet on tamm bara 'mann ha frouezh, ha bec'h adarre deus an abardae. Ha ma va ke re a draoù gato, alle sec'hiñ aneo 'benn an nouz, me avechoù mag a ve or panered bras, toud o devezh penn da benn a yeye d'obar var o zro, a ranken mon an devezh goude da lakar aneo da zec'hiñ ma va brav an amzar. Be' va



merc'hed ue a rae ar vichar kouerezed neuze, evit an dud. A vie graet pakadoù dilhed fank, hag a teuen e kêr gad or c'harr bihen, hag a gemeren e ti o fratikoù ar pakadoù dilhed fank evelse, lakeet en ol lien-roued ; dek, daouzek pakad hervez ar pratikoù, hag a vien koulz a lavar pad ar zeun e vec'hif hag e sec'hif an dilhed-se, hag a gasen aneo en-droñ d'al lun d'ar gêr da gemar adarre an dilhed fank deus ar zeun-se da von da vec'hif en-droñ. Hag ar gouerezed -se pa gomzen deus or familh, a lavere : "A ya, afviout mat a raof aneo, darpenn freskeet 'm eus aneo e-pad blavioù..." Ha memes, er Yeuc'h a va meur a gouerez, hag a teuen deus ar Yeuc'h gad or c'harr bras a vie lakeet ae e porzh an Tachar, ga pakajoù dilhed egise. Me ar re-se a noe merc'hed, divizourezed hag a bëyen, nie ket allet obar o-un, noe divizourezed evit gwec'h an traoù... Ha pa yeyoc'h neuze da Gempar tre an tren, padremenoc'htre ar Yeuc'h a vëloc'h neuze ar gouerezed deus bord ar stêr ae, e vec'hif var or maen plat.

Mamm 'va deut da Zouarnenez pa e deut an trefñ ; hag a va aet toud bouc'hichen kêr neuze gad o c'hezeg 'kichen ar barieren da ziskouel deo, da zalc'hen aneo, da voazif aneo deus an trouz, ha ma na spontfen ket zirak ar marc'h du. Darpenn mag a vie in im graet fi voar egise... Setu ign bet e-pad meur a zevezh e tiskouel deo an trefñ. Or breur da mamm a va e ti or vouerob kouzh bennak a noe deus koste Rosporden, pe e ti keren sur-awac'h, a falle ke defñ chom mi, setu 'va deut d'ar gêr var-droad, me deut a va hep tamm dilhed, hep tamm netra. Setu va dav mon da glask kemese on tammig dilhed. Setu mamm 'va aet gad ar breur-se, vei bla jofj dign pe trivac'h miz yaouenkac'h evitañ, o daou neuze en-droñ da glask an dilhed. Setu ar breur-se neuze 'lavar da mamm : "P'eus ken mon ae va'r pon, hag a vëloc'h ar marc'h du e ton. " An trefñ a teue beket Kempar. Setu mamm neuze var ar pon, sarr-nouz a va, deus koste



Ar re-men zo bagoù sardin ga div vern, hag ar c'hanojoù noe ken un aneo.



Rosporden a va, setu mamm kroget e bariniar ar pon pugur a vei e von da vèlar on dra bennak. An drae 'va ar vech kentañ a vèle an trefñ. Ken noe gwel neuze ar marc'h du gad al leternoù ru e ton. Mamm choñje dei a va deut he eur duveyañ. Hag hi a groge neuze e bariniar ar pon, fi voar, pugur ar pon a strilhe pa teue an trefñ zindan. Hag ar breur neuze va var an hen, o c'hoarzhin neuze pugur noe lakeet ar c'hoar da gowet aon.

E Tal a' Groaz a va on orolaj hag an dud a teue d'ar marc'had a dole or zell da welar hag-eñ noe ke kollet re a amzar da flepiñ gad un bennak. Hag a-drefñ an orolaj -se a va or funteun. Hag a-us a va or bolomig brofz var ar blomenn neuze ; an drae 'va or savadenn maen, ha deus pep tu neuze alloc'h lakat or brok. Hag eofñ noe ue or brok en e zorn. Me, goude e be sammet ar bolomig kuit 'vit obar plas d'ar c'hirri, ha sammet an orolaj... Ha fei d'an doujar ! Pa vie eur an trefñ da von kuit me respon mat doc'h var ar straed àman 'zo tremenet charbañioù karget neuze ga kesoù pesked, d'an daou lemmar. Neuze a va pavet an hen, setu an drae a rae trouz ! Kirri bras ae, fi voar pavar rod zindano ; kirri egise 'va toud e pep fritur 'vit kas ar c'hesoù. Hag or vech memes, un deus ar c'horbellerezed a va pignet var ar c'hesoù, ha risket ar vaouez, noe bet he gar torret. A vechoù 'vie c'hoa an etiketenoù e dorn ar c'horbellerez da lakar var ar c'hesoù toud en or von...

Ar bagoù na vien ke mi kreñ avac'h da von d'ar mour, a vie kaset da achuif o buhe e Por Ru, deus pep tu d'ar ganel . Beket Pouldeuilh a yeyen memes. Kentoc'h deus tu Treboul, darpenn ar c'hae a rañke chom dieub evit ar bagoù hag a teue da gas koad da Zouarnenez. Dont a rae koad evit ar vunuzerien, hag ae a va ol labouradeg hag a droc'he ar c'hoad. Ha deus Bro Norvej a teue bagoù evit kas greun d'ar vartoloded. Ae 'va kardioù e Por Ru da lakar ar greun deus an amzar ma vie kemen a beskerezh

sardin e Douarnenez. Pugur koulz a lavar, neuze a va un deus ar porzhioù plec'h a va ar miañ a bagoù. 'Vel just, ar bagoù a vie er porzh a jome er fes deus koste Plomac'h, n'allen ke don holl beket ar c'hae. Hag ae a va potred, an treizhourien vie lavert deuzouto, pem pe faec'h, ha nouz-de a vien ae en or gabanenn vihen, hag a noe or c'hanot kichen ar c'hae. Setu pa teue or vag, ha n'alle ke don tost avac'h, a rafke chom plec'h va dour, a vie hopet : "Treizhour !", hag an treizhour a teue deus e lochenn, a gemere e ganot hag a yeye beket ar vag, da dreizh aneo da zon beket ar c'hae. Ha memestra da von d'ar mour ue, pa va re bell ar vag, an treizhour a rae ar veaj da gas an akipaj beket ar vag. 'Vel just or briz a va 'vit an drae, ha peurliesañ ar memes treizhour a noe ar memes akipachoù 'vel pratikoù. Ar mest a bêye an treizhour. Me pep huni noe e bratikoù. Tri pe bevar treizhour a vie ato var veilh. Goniz a raen o zammig bara. E Por Ru, pa va ijel ar mour, 'vel just a dennoc'h ho poutoù hag ho pazoù hag alloc'h treuziñ, a yeyoc'h matreze beket ho taoulin en dour, me setu toud. Me, pa va uhel ar mour, rankoc'h kowet on treizhour.

E dibenn ar bla a teue potred ar Gelvineg, potred Gweien da besketi e bae Douarnenez, potred Douarnenez a yeye beket Gweien. Hag a teuen gad an tref bihen a teue deus Gweien, nign a lavare deuzoutañ Ar Gapenn, hag a teuen d'ar zadron da gemm ar rouejoù, hag ar vag a jome e Gweien. Setu er bagoù kouch a vie e Por Ru, an drae a zervije da di d'ar foeterien-hen, d'ar botred noe na ti na foz. A vechoù ar re-se a ziskarge ar c'hoad, a ziskarge ar greun, pa vie on tol labour da obar.

Be' va merc'hed hag a glaske meskled e kanel Por Ru ae, ha loud deuzouto a va ampart tre da gaout aneo. Be' va Mari Louiz Ar Meskled, honne an huni goushafi am eus anveet. Me kow a rae mat he banne. Ha goniz a rae mat

avac'h, pugur don a rae da verzh' aneo en otalioù. 'Vel ue ar cheor. Ar cheor a vie pesketet ae etre an Enez Tristan, hag Enez San Mikael. Or garregen a va gad on ti var gorre. Honne 'zo be freuzet gad an Alamaned e-pad ar vrezel, darpenn ign va en Enez Tristan, hag honne a droc'he deo ar gwel var kêr. An heñchoù bihen a teue deus kêr, er Yed ae, an Enez San Mikael a va just zirak. Setu ign n'allen ke gwelout hag eof a va on dramenak e ton beket an aod. Meur a verc'hed a rae ar vichar-se, me peurliesañ na vegn ket ar choaz deus ar merc'hed. Ha be' zo be c'hoa or familh all, Rouzig o ano. A, honne na vie ke mevieriez. Hag a yêye da zispenn meskled, hag a noe or c'harr kouch 'vit ar vugale vihen, setu a lake he faneroù meskled er c'harr. Or polkez maouez a vei, met e gwirione a vei or vaouezig chentil memestra.

Neuze 'va troc'het kae Por Ru deus hen Aod an Dimezelled. Bremen 'zo on hen a ra tout tro Douarnenez, me, ar bagoù kouch 'va ae n'ign ke be tennet, ar re-se o deus servijet a fon. Setu aller mon deus Plomac'h beket Pouldeuilh.

Matreze deus an amzar-se 'va on tregon fritur bennak e Douarnenez. Be vie lakeet er bouestoù : sardin - 'vel just a groge ar beskerezh sardin e miz Mezeven - glizigoù, met ar glizigoù a va pesked goñ. Hag honne a ve pa ve bras al loar ; ar glizigoù a teu gad al loar. Gwechall a vie senet ar glizigoù gad kanojoù, ha be' va martoloded a va ampart var ar vichar, da c'hout troeifi ar sen. Ae vie paket bihen ha bras. Me, choñj am eus e vêlar glizigoù bihen (ha nign lavere deuzouto blot) var ar c'hal, ha tud diva'r maez gad o c'hirri bras ga bailhoù bras e-barzh da garg' ar glizigoù-se da obar teil va'r maez. Darpenn a vegn re vihen da veañ lakeet e bouestoù. Be' zo tu ue gad ar glizigoù da zal' aneo, ha pa ign be salet da zisec'h aneo, da lakar aneo e poudoù

gwer ga gwinegr, omion bihen, tachoù jiroflez, geotennoù, hag e on dra dispar pa vegn bet or zeun bennak er gwinegr. Merc'hed Douarnenez a rae an drae mat-tre. Be vie c'hoia labouret er friturioù tofi e-pad an hafv ha brilli 'vel just. Er goñ vie graet gad ar brilli bras, ar brilli rouejoù, met en hafv a va kalz brilli bihen. Ha memes e-touez ar zardin ue a teue brilli er rouejoù, ha setu vien dispartiet, ha vien lakeet ue gad eol. Met evit ar brilli bihen egise, a va tu' Penn Ar Bed a anveye aneo ar gwellañ. Na va ke ken anveet ar brilli bihen gad eol egise er c'herioù bras. Ar brilli bihen a va evit begoù fin tu' Penn Ar Bed. Goude, pa e be deut on tammig pesked ar mour don, ae er be kroget da lakar ar pesked-se e bouestoù ue. Hag alies ven lakeet e bouestoù kri ha poeet goude. Gis bremen ue a ve lakeet tofi deus ar broioù tomm. Ya, ya, pesked an higennoù vie lakeet kri er bouestoù... Bremen n'eus ke mi kalz a friturioù 'zo chomet.

Arok ma va deut ar friturioù e Douarnenez, a vie graet sardin preset. 'Vie salet ar zardin, lakeet aneo e paneroù bihen ha pouezet avarno. Met an drae n'eus ke padet ato, obar sardin preset. Ha neuze, ar zardin fresk, ar c'horbellourien a brene aneo hag a gase aneo e peplec'h, e Pariz... Hag ar zardin a vie on tammig dibennet gad ar rouejoù a vie gwerzhet d'an dud. Memes, vie servijet an dud deus ar bagoù pa teuen en aod. Ha, mag a teue ar bagoù da unnek eur deus ar mintin, a fei, a va pres var ar merc'hed evit kowet sardin evit kreiste. Hag a yeyen ae var an dirioù a ziskenn e-kichen ar c'hal Ron ; sur avac'h meur a huni n'eus dreuet koueyel en dour meur a vech, kar kemen a bres a va, pep huni a falle def beañ servijet ar c'hentañ.

Or vech ofi be var an aod, neuze yeye c'hoia ar bagoù sardin d'ar zul d'ar mour, ha fi voar, ae e ti ar c'horbellourien a vie rebut, ar zardin a vie troc'het ar penn gad ar rouedenn, setu an drae vie lakeet a-goste ha

gwerzhet d'an dud... Setu or zulvezh, fin an abardae a vegn var an aod ae, ga ma c'hoar var an aod, hag-hi : "A-beñ, nign a zo von da gas ganom" a lar-hi dign "on tamm papar kreñ, ha ma zo rebut, nign a gemero rebut." Setu hi neuze goes ac'hanoñ deus an tu all, ha me nani va aet da vêlar hag-efi vie ke rebut. "A, ya merc'h, be' vo." "A-beñ mat tre, fi lako dign on dousenn, on dousenn -hantar..." M'eus ke choñj... "Ya, ya, lakeet 'vo doc'h merc'h." Ha vegn o tolar alon, pugur dustu a dolen alon egise avarno. Ha me glev un deuzouto e lavar d'ar re all, matreze vegn faec'h maouez : "Piv ar plac'h yaouenk-se ?" "Merc'h Mari Tal a' Groaz..."

Ha deus an amzar-se ue, vie ke gwerzhet ar pesked er c'hrie. Setu a vie komiserzed ar friturioù e-penn an dik, ha pa teue ar vag neuze, a vie chouet : "Pevar rael ar c'han e ti Chancerelle !" "Pem rael e ti Beziers !" "Faec'h rael e ti Lecluz !" Pep huni a choue ar briz evit he fritur. Hag a vie toud ar merc'hed e-penn an dik neuze gad or gador vihen e obar stamm e c'hortoz ar bagoù da zon. Hag ar mest var ar vol : "Piv n'eus lakeet ar briz an duveyañ ? Ti Piv ?" arok chom a-zav er fes. Setu an huni noe chouet an duveyañ hag ar briz gwellañ a vie d'ar re-se ar pren. Me, goude a vie chikan etre ar gōmiserezed, pugur un noe laeret traoù eben, pe on dramenak... Arabat a va d'ar vugale mon re dost deo, petraman a teue an diskaviar avarnoc'h mag a yeyoc'h re dost deo. Penn an dik a va deo. Ar zardin a vie gwerzhet dre gan. E paneroù malastran vien lakeet hag ar wazed a gonte aneo er vag, ha goude a vien gwec'het en dour. Vie lakeet ar panar en dour ha strilhed evit obar d'ar skann mon kuit. A-vechoù vie ke lakeet tamm priz deo. Pugur toud a gaye ato re ger ar pesked. Ha setu a-vechoù 'vie ke gwerzhet ar pesked. Me 'm eus choñj, Tontoñ Michel Po-lok a va mestrouar ue... Hag on devezh a va aet en arj, hag a va Giford ar pot-fritur, ha

Tontoñ Michel Po-lok pugur va priz ebet var ar zardin noe sklapet deñ ar zardin va en e banar en e fas. Setu an Otrou Giford noe ranket mon kuit pugur na va nemet skann deus e benn beket e dreid. Pugur na falle ke deo lakaat priz ebet, evit obar an distol, ato an distol. Hag e Douarnenez kouzh, ar merc'hed a laboure tre ar vilier. Paetdeus ar miliroù sardin a vie labouret er fritur. Ar botred 'va paeet d'an eur. Ha 'zo bet or grev bras 'vit d'ar merc'hed beañ paeet d'an eur. Mes deus an amzar -se vien paeet tre vilier ; va spontus al labour a vie. Darpenn, d'ar zul rafker labourat ue. Ar bagoù a yeye d'ar zadron d'ar mour, setu a vie pesked er fritur. Me, vie ke goeteet, a-pochub a vie be poazh ar pesked d'ar zadron da nouz, vie ke goeteet al leun da lakar aneo e bouestoù. Ar merc'hed a rafke labourat d'ar zul. Hag a-vechoù d'an nouz etre ar zadron hag ar zul a labouren, pad an nouz. Hag ar merc'hed bihen neuze, pa teuen deus labourat a yeye c'hoza da zantez Elena d'an overn gentañ. Hag ar merc'hed bihen paoul-se a va - darpenn an holl dud na gemeren ket or gador en iliz, darpenn ar gador a va or gwenneg - var o daoulin. Ha ken skuizh a vegn, ken a gousken, azeet neuze var o zalofsoù, a goueyen. Ha choñj am eus e kleout or vaouez kouzh e lavar pa vei merc'hig egise er fritur, or zulvezh pardon Santez Ana a va, a vei deut duveet tre d'ar gêr deus an nouz, hag hi a lavar d'he mamm : "diveñnet ac'hanoñ da von d'ar pardon." Ar vamm noe true diveñnif anei, kar ken kousket a vei, ken noe losket anei da gousket. Hag a noe kousket pad an de hag an nouz goude. Pa vei diveñnet, hi 'lavar : "a-beñ, poen e dign sevel evit mon d'ar pardon." Me, ne ke mon d'ar pardon a va, a va dav mon da labourat endroñ. An drae ar merc'hed bihen e servij an daol.

Tre vilier a vie paeet. Ae nani e bet potred ar friturioù oc'h obar or fortun. Darpenn, pa nie labouret

ugen miliar, vie lavert ( den n'alle gout pera a va deut er fritur, ae na va kontrol ebet ) vie lavert deo noe labouret pemzek miliar e-lec'h ugen. Ha pa vèle ar merc'hed ar pesked e ton er fritur, leun an daolioù a besked, hag an devezh o tremen... Ar friturioù noe ket im pesked a lake, ign lavere ar voul zu deus an drae, or panar malastran gad on tavañchar du en-droñ deñ, hag henne vie lakeet er prenest, er fritur, da ziskouel d'ar bagoù er fritur-se na vie ke mi prenet, a va avac'h... Hag ar merc'hed a lake a-vechoù ar voul zu arok ma nie gwel ar gomiserez. Pa teue ar gomiserez, an otrou noe lavert preññ c'hoza. Me, den morse noe ke lakeet ar voul zu e-maez. A nann ! Setu vie tennet ar voul zu en-droñ. On hantevor goude yeye ar voul zu en-droñ e-maez deus ar prenest... Pa gayen a vegn maro gad ar skuizhente e labourat, hag a vie prenet ato pugur na va ke ker ar pesked, setu va dav kargif, kargif, karqif. Setu an dud-se a laboure alies beket kreiste d'ar zul vintin, hag e-pad an amzar-se a vie toud ar boc'hichen -se en overn bred var ar reñchoù kentañ o kanif ar C'hredo. Setu evit mon d'an eur, a nie goueet gwellaç'h pegemen a eurioù a noe graet. Hag a zo bet on dispac'hadeg bras evit beañ paeet d'an eur. Goueet a n'eus. An holl friturioù 'va var zav, hag ar botred 'vel just a va deut e-maez ue, hag ar zouderien ue, pugur ar zouderien a va paeet deus ar pezh ma raen. Setu ar re 'va blivac'h... Or vichar vat a va evit ar re yaouenk a noe paket an tu da von buen ha da von mat... Var dro naontek-kan a va matreze. E friturioù a va a vie enebet deus merc'hed ma noe on tamm bara en o chakot da zribif e-pad o labour. Ya ! Darpenn a gollen amzar. Gwel' zo ue friturioù, vie jeranted, an otronij a rene deus uhel, be zo gwel friturioù e von er doufez, hag ar jeran e ton pinvidikac'h 'vit ar mest. Ar jeran a rae trafeg, hag ign a brene goude fritur o mest. Ya, an drae 'zo be gwel ue. Ha be va friturioù ue a rae

bouestoù dispar, a vie sôgnet mat al labour e-barzh. Da skouer ti ISPA, a verzhen kalz da von da Vro-Soz. Hag e Bro-Soz rafke beañ dibikouz ar vouest... Ha setu ae ar gomiserazed a noe ol levr ma p'eus c'hoan ; pegemen a alon, pegemen loskar aneo da boaat, toud an drae a vie jedet. Toñ a vie labouret ue. Setu e-kreiz an hafv neuze, pa teue an toñ ha pa vie sardin, setu vie labouret an eil hag egile. Me, deus an amzar-se a-vechoù pa teue potred an toñ en aod, pugur a vegn ga' gouelioù, pa vie ket ael... Neuze an toñ vie lakeet toud var or berchenn var pon ar vag, a-vechoù vien bregn. A-vechoù noe bregnet, re domm an amzar, ha noe ket allet don buen avac'h gatañ, pugur a ranken kowet ael da zon. Setu an drae a yeye d'ar fritur fez fall. Ha goude 'zo be diskuliet neuze al legrest. Mon da Moritani. An huni kentañ zo bet aet da Moritani e Bobineg e ano. (Er mare-se a vien pesketet ga rouejoù). Me choñj dign a va ginidik deus Kameled ha dimeet d'or plac'h Douarnenez, ha deut da Zouarnenez da jom. Hag ar vaouez-se a m'in emelle deus or zal d'obar frikoioù evit an eureujoù, kichen an iliz neve. Kar, e Douarnenez a va evelse : ar merc'hed nani zalc'he an tiez-kômers, hag ar wazed a laboure pep hini en e vichar en diavez deus ar gômers.

Ar Bobineg-se neuze, eof va or martolod... Eof 'zo bet ar c'hentañ da von da glask legrest, on tammig arok Per Pernez. Me, meur a vlavezh goude, Per Pernez zo bet anvet marc'heg a enor pugur a noe diskuliet ar beskerezh-se. Ar bagoù kentañ a zo be graet, an dud a breste arc'han d'ar mest da zevel ar vag. A breste arc'han da lakar var ar vag. An drae a va var-dro ar bla naoftek-kan seizh, eizh. Ar re a lake arc'han a noe neuze ol loudenn deus ar beskerezh. An drae a va e fiafs ; va ket im da von da di an notar. Toud bagoù Douarnenez, ar bagoù bras, zo be saet egise. Ar vartoloded 'zo deut da vestrouiri darpenn an dud a anveyen

a fie enno arc'han evit preññ ar vag ha sevel anei. Ha goude neuze a jomoc'h da gowet perzh e gwerzh ar pesked e-pad ma pade ar vag. Loud 'zo bet onest hag a raie d'an dud ar pezh a teue deo, loud all 'veljust pugur a dremene kemen a arc'han tre o daouarn a lake kalz frejoù var o bag, frejoù na vegn ket ato var ar vag me lakom var o zired, setu loud 'zo be deut on tammig buen pinvidik evelse... Me, bremen e ken ker ar bagoù, rafker kowet or gompagnênez 'vit obar an drae. Ha bremen martoloded Douarnenez n'allon ke mi mon d'ar Moritani, d'ar Senegal... Me ar beskerezh-se ! Kalz potred 'zo be kollet e mour Moritani. Eizh, dek den a va var ar vag hervez he brasente. Loud deus ar bagoù-se 'zo be kollet ar vag ga' toud ar wazed, n'eus ke be goueet morse penos e be c'hoarveet gato. Me, alies 'vie kollet un, daou. Darpenn, daou a vien var or c'hanot bihen ga' rouejoù. Hag a ranken mon en tarzh da dolar ar rouejoù. Setu, ma vien paket fall gad an tarzh, a vien sklapet er mour. Ha ral a va a vien kaet. Ral, ral. Setu alies pa vie kollet potred er Moritani, vie ato daou. A-vechoù un, me alies daou. Or beskerezh dañjerus a vei.

Ma breur a noe kemert ar vichar kalve var ar bagoù, pugur deus an amzar-se an holl bagoù a va e koad. Or vichar tenn, ato zindan an amzar, hag ar pezh 'va ar gwashañ ue, an drae va or vichar er goñ na va ke kalz labour, pe neubeutac'h a eurvioù. Na va ke sindikajoù, me, memestra a noe saet or "mutuelle" etreo, evit chikour ar re a jome klañv pe evit ar re noe ke labour. Gouel San Jozef a va o gouel. Hag a veloc'h toud ar botre'-se e ton d'an overn da eizh eur, toud gad oteiar voulouz. Ha goude neuze, vie or pred, hag on tammig cholori var an hen deus an nouz ue. Hag ar botred pa m'in gayen ue a rae or parti kartoù, petraman c'hoari galoch, gad or gwenneg m'oni bennak var ar galoch.

Deus an amzar-se 'va brav tre gwelar ar bagoù e von d'ar mour deus an nouz. Neuze 'va gouelioù var ar bagoù, gouelioù rouz 'vel ar rouejoù brilli - vie graet koue d'ar gouelioù. Ha choñj am eus be var an aod e vèlar ar bagoù e von kuit, ar mest var vol 'vel just, hag an akipaj neuze an daouarn er chakotoù. Pugur a ranken mon gad an ael ; da von da gemar an ael neuze a yeyen dustu du-se deus tu Santez Ana da von beket Morgat, hag a-vechoù a dreuzen dustu ae a-drefiv ar Flimiou. An drae a va brav tre, ha d'an eurvioù-se a vie an heol e von da guet. Hag ar wazed-se er vag, sonn 'vel piliroù, pe neuze a-vechoù vie labour da obar... Choñj am eus gwelar un e faoutifi bilhetez bihen keuned pugur a vie graet da zribifi er vag. Ha nign a verzhe pout-houarnoù bihen, pout-houarnoù ga tri bav. Ha vie alies memes kemert or pezh mell kotar a vie lakeet an tan e-barzh hag ar pout-houarn avarnafi. Nign a verzhe an drae d'ar vartoloded. An drae 'va pout-houarnoù da von er bagoù pe er c'hanojoù... Neuze 'va kalz kanojoù bihen ue, hag a vien e obar peskerezh brilli. Potred Pouldeuilh a vie ampart var ar beskerezh-se ; a raen an drae en hañv, hag er goñ peurliesañ a vegn toud mañsonerien pe pikar-men. Ha potred Treboul neuze, er goñ, a noe toud on dachenn douar... Hag er goñ neuze 'laken kol bihen hag a teuen da verzhiñ ar c'hol bihen e kêr, var ar blasenn da dud va'r maez da bikifi neuze 'vit kowet kol. Hag a teuen, alies memes, var or gravez-daou-bennek, ha setu vie on den zirak hag un all a-drefiv hag ar pakajoù kol bihen var gorre, hag a teuen egise deus Treboul. E Tal a' Groaz vie gwerzhet had ue egise e fin ar bla. Toud an drae 'zo dispariset. Saout vie ue. Er c'hui vie kalz tud. Deus ar Pon teue kigerien da verzhiñ kig da Zouarnenez d'ar zadron. Graet vie loudennoù, ha vie tolet bilh var al loudennoù. Lakom vie aet pidir maouez a noe im loudennoù kea, setu ar gigerez a droc'he neuze on

tamm gorailhoù, on tamm kig, on tamm kalon, on tamm dru, fi vel, hag evit nôm paz kowet trouz, a vie tolet bilh var al loudennoù. Or vaouez a gemere on alve, un all on dra all, hag a rae aneo d'ar gigerez. Hag ar gigerez a rae ar bilh var al loudennoù, ha pep hini a gemere he loudenn. Ha pa vie ret ranniñ on dramenak etre ar vugale, goude maro ar geren, a vie tolet ar bilh ue. Hag an devioù foar a teue ato, div stal a va, da verzhiñ tokoù 'vit ar beizanted, ha vie lakeet or voulouzenn. Hag ar re-se a teue fas d'an ti, var riblenn ostaliri Breizh. Setu ar beizanted a teue e kêr, ma noe im on tok, a choazen on tok ae, ha vie lakeet dustu ar voulouzenn hag ar vouklenn neuze a-drefiv. Potred Ploneiz teue ket ar voulouzenn var o c'hegn. Potred Ploare, Poulann, ha re Ploudraeged, ar re deus ar c'horn-mañ a noe boulouzennoù hag a teue var ar chouk. Merc'hed ar Pon a teue, deus Poulgwazeg, Kapiz a teue ue, tud Kraon. Deus pell avac'h a teue an dud. Deus Gwengad a teue tud da verzhiñ keuned. Ya, en amzar-se teue tou tud va'r maez da verzhiñ o zraoù.

Setu 'vie vioù, amann, laezh. Al laezh a vie pe trivac'h tinar pe daou liar ar muzul. Ar vioù, vie ato trizek en dousenn, an dousenn vioù trizek a vie matreze dek kweneg, an amann a vie pavar rael al lur, ya, ma va pem rael, an drae 'va or gernez, an drae 'va re ger. Kar, kalz boued vie graet ga' gres deus ti ar charkutar. Ar boued peurliesañ vie graet ga gres dous, an amann a va re ger. D'ar gwenar, peurliesañ, e pep ti a va krampouzh. Yeye ar billig var an trebe. D'ar zul a vie soubenn ar c'hig. Vie prenet loudennoù kig er c'hui, hag er zeun matreze 'vie c'hoa or vech ragot gorailhoù. Kalz soubenn vie drebet : soubenn al lugumaj, ha fi voar, goude ar zoubenn a vie on tamm bara 'mann, mag a va amann en ti, petraman bara segel. Avaloù poazh flastret a vie graet ue. Avaloù flastret a va avaloù douar diblusket, a vie troc'het tre



tammoù gad omion en o zouez hag alon, ha pa vie poazh a vien flastret hag an drae a vie drebet ga' laezh tev. Deus an nouz peurliesañ a va soubenn. Ha deus ar mintin alies vie kafe trempet ga' bara e-barzh. O, toud an dud nie ke kig pep seun. Me, kalz bara vie drebet. A vie torzhoù bara e ti ar baraer, ar re dek lur, ar re ron bras ae. Henne vie pouezet, ha ma va ket ar bouez, a vie lakeet doc'h on tamm da achuif ar bouez.

An drae a va dek lur, pem lur, div lur, me vie ke graet flutennoù ; an drae a va re a faltazi. Matreze a vie graet un bennak evit ar vouc'hichen. E ti ar charkutar a vie prenet pastez euilh, pe pastez penn pe neuze gwadigennoù Ragot silzig vie graet ue alies. Merc'hed Douarnenez, peurliesañ a va intañvezed hag a noe bugale da zevel. Setu pa jome or vaouez intañvez va ret dei labourat er fritur. Loud ue a va ferouezed ; feret vie ar rochedoù hag ar ridochoù. Hag ar re a va ijin avac'h enneno, ha be rafker be ue kalonek, loud deuzouto a rae bara segel. Anveet am eus div hag a raie bara segel, hag a raie an toazh o-un, hag a raie ar bara, hag a gase aneo da di ar baraer da boaat. Met an torzhoù bihen bara segel a va ozet gato. Ne ket ar baraer a oze aneo. Pa vie poeet ar bara segel, peurliesañ an drae a va e fin an abardae, noe or c'harr bihen, ha vie lakeet an torzhoù bara e-barzh, or balansoù vie dalc'het gad an dorn, hag a teuen neuze var ar straed d'obar tro kêr. "Bara segel ! Bara segel !" Setu an dud a brene. Me zo bet alies e prenif bara segel e ti tan Aneig Bida - darpenn a noe or penn gavr - pugur deus o zi a verzhen ue. Hag evit ma c'homision a moe div pe deiar gwastell vihen, pugur me moe graet ar c'hefridi. Setu Tan Aneig Bida a reye dign div pe deiar gwastellig.

Loud all, pa va mare an avaloù a gase d'ar forn ato ti ar baraer, en o poudezoù pri bras, avaloù da boaat. Ha dav d'ar c'harr bihen en-droñ neuze. Ma vie on ta'-kouzh

en ti, eñ nani vie en daou lemm, me a-vechoù a vie ar merc'hed a raie o-un. Div, teiar bodez vras er c'harr : "Avaloù tomm ! Avaloù tomm !" Hag ar c'harrigell neuze a jome a-zav da c'hortoz an dud da zon gad or volenn da brenif avaloù poeet, 'vit daou wenneg, vit pavar wenneg. 'Vel just an avaloù a va var-gorre a va rouzet brav, ar re all a va gwenn. Vie lakeet doc'h neuze, lakom pavar, pem deus zindan hag un rouz deus var-gorre hag ol loa soz. An drae va e mare an avaloù. Ha pa va achu an avaloù a vie poeet riz. Setu adarre ar c'harr bihen e von. Setu a teuoc'h adarre gad ho plat da brenif riz tomm ; a vie loadadoù. Pet loadad a poe im. 'vel just ar re gentañ noe miac'h a groc'hen. Deus an amzar-se a vie gwerzhet pesked egise var ar straed deus an abardae. Ar c'hanojoù brilli bihen a va deut re zuveet evit ar marc'had arok kreiste pa teuen deus an abardae, be va merc'hed a raie ar vichar-se : prenif pesked da zon gad o fanar evit kinnig pesked evit mare koan. Hag a va ato ar memes re hag a rae ar vichar-se. Hervez ar pesked a va : brilli bihen, sardin. Hag ar panerad kentañ sardin peurliesañ a vie e Gouel Yan, miz mezeven, hag ar panerad-se a vie lakeet or vleunienn var ar panar da ziskouel 'va ar zardin kentañ a teue en aod. Merlañked fresk a vie ue. Ma pie bet avaloù douar flastret da greiste, a pie matreze or pesk fresk deus an nouz. Ha be' zo be graet ue e Douarnenez dantelezh Irlann, giz n'eus dalc'het ar vigoudenned da obar, ha vien gwerzhet da von da lec'h all. Pe neuze e-pad an hafv, pa teue an estañjourien e kêr, a brene ue. Be' zo be graet ue rouejoù brodet, da deurel var ar gweljoù, ridochoù. Kalz merc'hed a n'eus labouret. Ha be va merc'hed a noe pratikoù e lec'h all. Setu a labourer 'vit ar re-se. Hag a vioc'h paeet ue hervez ar mailhoù a poe labouret. An drae a vie koulz lavaret pasedennet. Goude e be divodet. Ha neuze ar c'houefoù a vie graet evelse. Vie graet roued gad an dorn, ha vien broudet ue. Pe var ar stern

pe broudet var papar. Me a vroud ato. An dilhed paskoù  
ue a vie broudet. Ma zilhed pask dign a va roued zindan,  
ha broudet ar bleunioù var ar mouslin. Ar merc'hed yaouenk  
er profesionoù a zouge ar Werc'hez ga' dilhed gwenn broudet  
hag ar merc'hed dimeet a zouge Santez Ana ga brozhioù a liv.

DISLIALDE .

Kindirvi 'm eus bet ue er vrezel-se, setu vie  
kelou deus an eil pe deus egile. Mes or c'henderv dign  
neuze a va e labourat e Pouldeuilh - nign a lavere deuzouti  
ar fritur fez fall - or fritur fi voar, plec'h a vie labourer  
ar restachoù pesked, ar pennoù evit obar eoul ha neuze ludu  
evit an douar. Meur a dra ve tennet fi voar deus ar restachoù  
pesked egise, ar pennoù, ar boualloù, ar pesked 'vien ke  
gwerzhed... Met an drae rae or fez spontus ! Tud Pouldeuilh  
ae a va ampoezonet ; spontus a va : ar fez a yeye peblec'h.  
An drae 'va var hen meilh Kerru, dustu pa yeyer kuit deus  
Pouldeuilh ae, deus an tu-men d'ar mour. Pugur meilh Kerru  
'zo tu da von dre an hen bras. Met a-dreuz, arok mon da  
Gerru a dremenor zirak ar fritur-se. Setu moe or c'henderv  
a labourer ae. An drae 'va memes arok ar vrezel pavarzek.  
Hag a vegn daou vichirour ha mar plij ganoc'h, on trede  
neuze a rene aneo, or c'hontremest ma fall doc'h 'vit kas  
al labour en-droñ. An traoù a yeye mat en-droñ gato o zri.  
Ha setu ar zulvezh vintin an den-se 'va be kaet laet var  
bord an aod e Pouldeuilh. Darpenn da von da Bouldeuilh deus  
an amzar-se na reiom ket an dro ae... nign a droc'he e-kichen  
an ti zo ae var lerc'h an hent-houarn fi voar deus an tu  
diou, ae zo ue or stêr vihen... me choñj dign e ar feunteun  
vregn vie lavert deuzoutañ... Hag e lec'h obar an dro, a  
dreuzor ae tre an aod, pa vie ar mour ijel, an drae a rae  
on hen, ha reor ket an dro, hag ae 'vel just a va geot.  
Hag an den-se a va be kaet ae, laet. Hervez ar mod a va  
e ton deus or frikou bihen deus ti e verc'h a va e chom e  
Douarnenez, hag a va e-un o von d'ar gêr, ha va be kaet laet  
ae. Setu va dao klask piv a va. Va deut neuze poliserien  
Kempar. Setu ma c'henderv dign va be goulenateet fi voar,



pugur memestra a labourer gatañ, hag eoñ nani noe kemert e blas da ren al labour. Setu, klaskit da biv a dalvez ar plas ? Setu noe lavert, noe displeget mat. Me, va ke be pell a noe kaet va or pot deus Pouldeuilh. Perak noe laet ane ? Diaes a ve da c'hout. Evit netra . Setu henne 'vel just noe be prison. Eizh 'loa bennak. Goude e be deut en-droñ d'ar vro, ha memes dimeet e Pouldeuilh. Ha setu ma c'henderv a va en e blas, setu al labouradeg a yeye en-droñ. Me, deus an nouz a teue an huni maro en-droñ var al lec'h plec'h a labourer - Pugur a va e chom en ti-se, goude e vreg va aet kuit 'vel just, deut da Bouldeuilh da chom, pugur al lojeiz a rae parti deus al labouradeg. Ma c'henderv a vèle ane... Ha n'e ket or vech ; an drae n'eus padet seunvioù ha seunvioù. Al labouradeg a yeye en-droñ 'vel ma vien bet o zri e labourat e-pad an de ! Memestra Doue ! Ar memes trouz, hag ato vie goulou... pa teue an Ankou - oblijet ver da lavart an drae... An dud a vèle, hag a lavare d'am c'henderv : "Tie ! te t'eus labouret duveet dec'h da nouz 'vat ; me 'm eus tremenet ae var an hen, hag a va goulou bras er fritur..." "Ya, ya..." Falle ke deñ lavar petra a zigoueye. A soñje : "An drae a dremeno". Met an drae a bade. Hag an dud a vèle goulou, hag a gleven an trouz, hag a joñje deo ar re-men nani va e labourat. E vreg yaouenk deñ va dougerer, n'eus ket klevet morse trouz ha n'eus ke gwell morse netra. Na va nemet eoñ hag a vèle ane e labourat. Hag en ti a teue ue, e korn an oaled da lakar tan var e gorn-butun. Met an drae a teue da veañ... noe ket aon, me... Setu on devezh, kemese, hegaset : "Me 'zo von da c'houl gatañ pera 'ma e klask ha pera a fall deñ..." Darpenn Lan Ar Bruñ (a va e ano) a va on den dispont... Ya on den dispont a va. Setu a joñje : "Moñ e von da c'houl gatañ : pera t'eus im, pera 'mout e klask." Pa va arruet matreze daou baz, daou pe dri baz deuzoutañ da von da c'houl gatañ, noe ke bet amzar ar vouezh da zon

e-maez, flip, va mi den... Va ke mi ae. Setu da gentañ ne lavare ke netra ; goude noe lavert d'e vreg : "Ma ket e ene sur e renoz, kar don a ra da labourat." Ign a lavare deus an drae, kea, e maro arok e amzar. Pugur an drae a gendalc'he, va lakeet otrou Person Pouldeuilh ue 'benn neuze er goñfidañs... An dud a vèle goulou hag a gleve trouz. Setu 'barzh ar fin an otrou Person noe lavert : "Dav e pedif evit renoz e ene. Sur avac'h a n'eus im renoz e ene." 'Barzh ar fin an drae va be goueet a teue an huni maro ae... "O, an dra n'e ke gwir, an drae n'e ke gwir." Setu ma c'henderv lavar neuze d'ar re a lavare ar c'hrefvañ hag an uhelañ an drae na va ke gwir : "Deus ganign varc'hoa da nouz ha te glevo, me te vèlo ue..." Me, den n'e ke be morse kalonek avac'h da von d'e di. An drae zo bet achu egise, met an drae n'eus padet pell. Pell-tre memes...

Ma Doue, e-pad ar vrezel ue 'meus klevet tud e lavar 'va be laet o zud, hag a n'eus gwelt aneo... Mamm-gouzh Janet Kerivel ae noe ken or mab anei - gout a rit piv e Janet Kerivel, moerob M.U... ae a zalc'he ostaliri, he mamm-gouzh, mamm he zad, pugur tad Janet Kerivel a va pennour ; me he mamm-gouzh ue noe saet on niz dei, or minor, a va be deut bugel en o zi... Setu an drae a va e-pad ar vrezel, neuze gwel a rit... Nign lavere deus an drae kowet dislialde... Setu ar vaouez kouzh-se va e ton or zulvezh deus an overn bred hag a vei e ton neuze, pugur honne zo e chom, plec'h lavarfen doc'h, pa mer e tiskenn da Bor-Ru, an hen kentañ a droer ae a ya just zirak ti ISPA... Setu pa noe troet ar c'horn-tro e ton deus an overn-bred, hi a vèle or soudard e von zirazi : "O, o, Rene, henne 'zo deut e permission." Hag ar soudard-se a va aet en he zi, en antre. "A-beñ, arruet a vo en ti arozof... Evurus moñ e ton, panefeze nie ke kaet den..." Deut en ti, setu joñje dei nie kaet Rene el lae ; va tamm Rene : ha gwel a noe ane e von en trepas. Setu hi goul gad an amezeien en-traoñ :

"Me 'm eus gwel Rene e ton ae an antre, a vegn e ton deus an overn bred. Deus e gegn anveyen ane. P'eus ke gwel ane ?" "Nann, 'm eus ke gwel na klevet netra." "O, an drae 'zo drol 'vat..."

Kaer 'va be klask Rene er jardin vihen a-dreñv, el lae er grignol, en e grâm neuze pugur a noe on tammig kabinig deñ e-un ue, va ke kaet morse Rene. Met on devezh bennak goude, va deut kelou dei Rene va laet d'ar mare-se. Ha sur-avac'h e soñj deñ va deut arok mervel ti e voerob - en e di ma p'eus c'hoan - ha setu e voerob noe gwell ane...

An drae 'zo souezhus fi voar, met an drae c'hoarvez. Lavert 've : "O, ya, ar re gouzh a voar soriennif egise." Nann, n'e ke soriennif. Me bremen n'eus ke kemen a zarampred etre ar re varo hag ar re vev 'vit ma va arok. An drae n'e ke kofchennoù.

Ma moerob neuze, moerob pot Pouldeuilh ae, a n'eus gwel ue he mest, henne 'va mest or ger, ha noe bet or maro trumm, iskis avac'h. Me, a n'eus gwel ane meur a vech e ton deus ar park gad e falz var e skoa ; hag ar falz 'va gatañ pa e be laet koulz a lavar... Meur a vech n'eus gwel ane e ton deus ar park d'an ti gad ar falz var e skoa. Ha goude 'vel just, an drae 'zo be pelleet, ha na vèle ke mi. Hag honne, ma vie un bennak deus he familh tost dei e vervel, daou vez deus he dorn, n'ouzoñ ke pe an dorn diou, met ato ar memes dorn, an daou vez a teue liv ar c'hoar avarno. Ha mag a va keren pellac'h ne teue ken pennoù ar bizied... Me, ma va keren tost-tre breur pe c'hoar, a teue toud ar bez melen. An daou bez kreiz, 'vel div goulaouenn goar... Ha n'eus be graet dei an drae alies - 'vel just noe gwel ue kalz tud mervel en-droñ dei deus he familh ; kollet a noe c'hoarezed, kollet a noe he zad, he mamm - ha da gentañ gompren ket ; a frote he bizied, me goude... N'ouzoñ ket, or vaouez kouzh bennak

noe lavert dei : "Me, ma merc'hig paoul, an drae 'zo dislialde. Pa zo un bennak deus ho kwad e von da vervel, ho pizied n'eus ke mi ar memes liv." Souezhus. Ma, honne e ar memes huni memestra hag a vèle he mest e ton...

III

KOLLET ER MOUR.

Peurliesañ, pa vie kollet un bennak, ar vag a teue d'ar porzh. Setu neuze mest ar vag a yeye d'ar "bureau maritime" da zisplegañ penos a va c'hoarveet, me 'benn neuze ar familhoù noe goueet. Goude a yeye un deus ar burev da gas kelou er familhoù. Setu a vie or servij bras evito. An iliz navie ke morse bras avac'h pa vie kollet un bennak er mour. An drae a c'hoarveye ive ga' bagoù brilli, darpenn ar bagoù-se ive a yeye da besketa en Norz, ha setu vegn var hen ar bagoù bras. Hag a-vechoù, an amzar fall a lake aneo da von er strad, me a-vechoù on akipaj all nie allet gwelar aneo, petraman a youien piv a va pellac'h evito, ha deus ar mintin goude na vie ke gwel mi netra. Setu be vie kaet var ar mour tammoù koad pe ga niverenn ar vag, hag ign a vouie pera a va var pep bag, setu egise va tu da c'hout a vegn kollet ha bag ha tud. Setu perak e Douarnenez a zo kalz miac'h a verc'hed intañvezet.

Er bla hantar kan a va be kollet or vag deus Douarnenez, e miz feuvar. Or vag brilli a vei. N'ouzoñ ke pera a va c'hoarveet. An akipaj a va kousket en o gwele. Ar mest a noe graet an hen d'an den a va var vol da zon da Zouarnenez. Pugur a jomen ato daou var ar vag, un er penn arok hag un all var vol e penn all ar vag. An den va vol noe matreze faziet gad an taniou, kouskoude va sklaer avac'h an nouz, matreze noe faziet ga tan ar bourc'h



Hag ae neuze ma ar botre' kouzh var ar vougar var ar blasenn... Ar re-men a zo chupennù gato... Un 'zo ur vuruzenn gatañ. Ar re gozh vie ga chupennoù mezhar hag on otou lien... Hemen zo ret, hañ? Henne zo heñvel deus Jos Tol' deo breur ar Martir kouzh...

on tammig arok don da Vorgad, ha va aet ar vag var ar reier, en im fritet var ar reier. Loud deus an akipaj noe allet don e-maez. Pugur na velen ke sklaer, nouz a va, abred tre deus ar mintin, me gwern ar vag a va koueet ha setu ar re a va be paket zindan, noe ke allet m'in zifretif da zon e-maez. Pignet a noe gad an tevenn giz ma noe allet da von da glask chikour. On tammig pellac'h va'r maez a va tired, setu an huni kentaf noe alle pignal gad an tevenn va aet da glask chikour. Deut va an dud da chikour ga kordennoù ha neuze ga' fanilli da vèlar sklaer on tammig ; toud ar vorc'hadenn vihen ae va be var zav 'vel just. Deus ar mintin, pa noe gwel plec'h noe allet pignal, gomprenen ke morse penos noe allet sevel gad an tevenn-se. Me, ar vag va be fritet... Deus lae an tevenn, pa zelloc'h deuzouti, an dra 'va 'vel or vouested alumetez. Chomet va er mour pavar mabae... Deus an akipaj 'va chomet pavar er mour, ha dek pe unnek a va var ar vag. Setu 'vel just ar re-se va deut tre an hen d'ar gêr. Me, choñj am eus an de goude a va aet re ar familh var al lec'h da vèlar. Toud an akipaj va ae. Ar re-se va aet en-droñ an de goude var al lec'h da vèlar hag-eofñ nie allet pa va ijel ar mour saviteif on dramenak, pe nie kaet ar c'horfoù. Me, nann ; na va korf ebet er vag. Me va be var al lec'h, pugur mab Tan Roza a va er vag-se ha chomet a va e-barzh, he mab henañ. Na zisoñjign morse pa vam digoueet du-se var al lanner, pa noe gwel potred ar vag ar familh e ton, pep huni a stoue e benn, den na bade ke komz ga mamun an huni beuzet. Meur a ze er be e klask, me kaet ign be an eil var lerc'h egile, var an aod e-touez ar c'herreg. Me n'am eus ke gwel mab Tan Roza ; vei ke be memez losket, va be lavert dei... darpenn midisin Kraon a va deut var al lec'h, hag henne va or pot Douarnenez, a noe lavert dei : "Gwellac'h e doc'h nom paz mon da vèlar ane, egise a vèloc'h ane ato bev, ha ma yit da vèlar ane 'vel ma 'mañ, ato a jomo ar skeudenn-se

en o choñj." Setu hi lavere : "Matreze e vreur allfe mon ?" "Nann, nann," a lar ar midisin "nann, paz e vreur kennebeut." Darpenn eizhte va be er mour, setu noe stoket ha distoket gad al lano fi voar, deus ar c'herreg. Me e-pad eizhte 'va be e boeron, e dad, ar breudeur e furchal var an aod. Me, kaet 'va be memestra. Ar re all ue va be kaet. Toñtoñ Nol hag e boeron noe kaet ane. Ya, e boeron hag e dad noe kaet ane. Setu va ranket obar serjoù buen ha buen da lakar aneo e-barzh, ha va deut d'ar gêr ganom neuze dustu raktal. Setu a va be nouzveilh ue. Gwel a rign ato ar penn plec'h a va en e serj 'vel just kea, a va or goulou bihen, na va ke gwall sklaer, ve ke lakeet morse re sklaer or penn plec'h a ve un maro, hag an drae va e dibenn an nouz, gwel a raof c'hoa, er penn-se a va chomet 'kichen ar serj e genelied, potred ar ru, ar re noe c'hoariet gatañ buqel, ar re 'va be er skoul gatañ, a vegn pavar pe bem kichen ar serj var kadorioù, e nes rannif or grik. Mut a vegn. Pa va deut de an intaraman, d'or zulvezh a va bet interes, toud an dud noe digaset bleunioù, setu e vamm a lavere : "Beuzet e be, me bremen e beuzet e-touez ar bleunioù." Kaer 'va an amzar da ze an intaraman, ha leun chouk 'va an iliz gad an dud. Darpenn, pa vie kollet evelse unan bennak er mour, tout familh an akipaj a teue d'an intaraman. Hag ar familhoù a noe kollet un bennak hag a va e intaraman un all, a teue er c'hañv 'vel ma vie be intaraman o huni. Evelse 'va ar boaz. An holl familhoù 'gemere ar c'hañv. Me, alies, kalz tud 'zo aet er mour egise bag hag akipaj. Spontus e pegemen n'eus drebet ar mour-se martoloded yaouenk Douarnenez. Goude, pa e deut ar bagoù brasac'h, krefnac'h matreze, ha c'hoa... A-vechoù 'vegn troc'het ga bagoù brasac'h evito, ha na va ke goueet pera 'va c'hoarveet...

IV

KELOU MAT HA KELOU FALL.

Peurliesañ a va or voerob hag a yeye a di da di da bedif ; ha pa vie tu' va'r maez neuze a vie kaset ar wazed. Darpenn, ma rankom nign mon beket Pouldraeged da bedif tud, fi voar... Ar wazed vie kaset, giz kas ue keloù ar maro. Vi keloù ar maro vie ato ar wazed. Neuze pep huni a n'um garge da gas keloù da gereñchoù on tammig pellac'h. Me, ar gereñchoù tostañ, a vie ato kaset deo keloù ar maro tre or vizit. Setu a-vechoù teue ar wazed on tammig lipet d'ar gêr deus an nouz, pugur a vie or bannig e pep ti. Ha 'vit ar pedennoù eured 'va egise ue. Ar wazed 'vie kaset. D'ar zul neuze a yeyen kuit deus ar mintin, a zreben ti un pe ti un all, a teuen d'an nouz d'ar gêr neuze da velar ha nie graet toud ar pedennoù 'va fiet enno. Kinniget 'vie ato or banne traoù dous pa yeyer da bedif an dud. Kognag, Rom Plouz pe Malaga. Pep huni a zibabe, hag ar wastell vihen sec'h a teue neuze. Petraman neuze, vi an de kentañ ar bla, gwin tomm. Hag en ostalirioù, toud an ostizezed a rae gwin tomm d'o fratikoù.

Ti Tan Mari Frien ae, a vie fornajoù, toud on akipaj. A vie lavert, fi teuo d'an eur-mañ-aur, ha goude vie on akipaj all, ha vie kan ; un pe un all deus an akipaj a gane ato. Ha me 'm eus choñj da veañ ae on de de a bla egise, hag a va Toñtoñ Fañch, hag henne 'va soudard, hag a yeye kuit deus an nouz, hag a va e ti Tan Mari Frien, hag

a velofañ ane ato e stikiñ bontonoù e dunikenn, hag a noe on tamm koad plec'h a yeye ar bontonoù var reñk, ha gad or vroust, egise na vie ke louzet an danve, hag a velofañ ane c'ho a o stikiñ bontonoù e dunikenn.

Giz krowadur 'm eus gwelet ue var hen Ri, on usar mabae dreue beañ an drae, on tok houarn gad ol lost marc'h var e gein, getroù a teue defñ beket e zaoulin. Setu va var varc'h. On tunikenn du a noe... Or pezh mell pot kaer, bras, or sabrenn deus e goste... Gwel a raofañ ane c'ho a var hen Ri, be e velar e geren, or vech matreze e-pad an tri loa noe otre da zon, an drae va ato arok ar vrezel pavarzek, e krial forzh en e frienienn. Teiar pe bidir a vam, merc'hed bihen var bord an hen... Me a jofñ dign a dreuen be be truezus spontus e velar ar pot-se o ouelañ kemen all n'ur von kuit deus e di. Me dour d'e vec'hif ! Gout a rae an hen, mon a rae var droad, hag a va un deus e vreudeur michañs e tougen defñ e bakad en e gichen, da zon da gemac'h an tref e Douarnenez, hag ar sabrenn neuze e ruziñ penn 'a benn an hen.

Pa vie un maro en or familh, pa vie reñket var ar vaz-kafv, deus an nouz neuze a vie pedennoù. Darpenn deus an amzar-se a jomoc'h pad an nouz gad an huni maro. Ha memes div nouzvezh hervez an eur ma vie maro. Ma vie maro ken en de a vie div nouz-veilh. Me, a-pochub a vie div nouz-veilh, a jome tud ato div nouzvezh gatañ. Vie ke losket morse or c'horf maro e-un. Setu a vie potred pe merc'hed, me potred alies hag a teue da lavar ar pedennoù. Ae va on den kouzh er Stankou hag a lavere ar pedennoù tre eñvor. O, an drae a bade pell avac'h. Pedennoù an nouz vie lavert ue, ha neuze pedennoù var ar maro, ha var sevel adarre deus a varo da vev. Setu en-dro d'an den-se a vie toud an dud : ar geren, an amezeien, kalz tud. A-vechoù memes, va ke bras avac'h an ti, pe ar

penn pe daou benn memes, a rafñe an amezeien digorifi o dourioù evit lakar an dud.

Pa vie achu ar pedennoù neuze kea, loud deus an dud a yeye kuit raktal, me kalz tud a jome. Setu matreze on hantevor goude, a va ar boaz ganom da ginnig on tamm bara 'mann. On tamm bara 'mann hag or banne gwin. An drae, an amezeien a m'in emelle deus an drae, vie kemert mar plij ganoc'h flutennoù bara a vie amanennet, tevig avac'h, o, va ke sellus an dud. Ha setu un a teue gad he fladad bara amanennet, var he lerc'h a teue un all gad or verenn pe meur a huni da obar neuze or banne gwin da evifi gad on tamm bara. Ha loud deus an dud a gave mat on tamm bara 'ozveilh egise ! O, gwellaç'h 'va henne 'vit on tamm bara drebet en o zi ! Ma ! 'Benn on or goude, yeye neuze ar miañ deus an dud kuit hag a jome ar re dostañ, petraman neuze ar c'henelied bras a jome gad ar familh. Neuze pa vie dek, daouzek hervez ar familhoù hag ar c'henelied a va plas avac'h e krãm an huni maro. Me, vie ke butunet er grãm-se ; ar botred a noe c'hoan da vutunifi a yeye en or penn all. Ae, neuze vie kontet konchennoù. Darpenn an dud 'jomen ke da lavar o chapeled. A-vechoù a vie c'hoarzhadeg vras ! Ma va on den kouzh, pa va ke kemert ar galon... Ma va on den yaouenk, pe neuze c'hoarveet on dramenak, neuze den na ranne ke grik ebet. Hag an amzar a dremene brav tre. Me, deut tevor, pidivor, 'benn neuze an dud 'va deut ar c'housked en-drofi deo, a vie graet or banne kafe. Hag ar wazed noe memes arok an drae or banne hini kreñ er grãm all. Me, a jome ato daou gad an huni maro. An dud a yeye da evifi kafe, me gad an huni maro a jome ato daou deus gard. Ha pep huni a teue en-drofi da gemer e blas beket seizh or deus ar mintin, ken ac'han a zaie tud an ti neuze. Ha pep huni neuze a yeye d'e di, da zon en-drofi arok an intaraman, ha memes alies deus ar mare-se vie lakeet an huni maro er serj ken or c'hartor

arok eur an intaraman. Hag ae, a vie lavert pedennoù arok lakar ane er serj, hag a teue ar beleg neuze da glask an intaraman. Neuze vie douget an dud ga' gwazed. 'Va ke tamm karr c'hoa. Ar c'harr 'zo deut er bla naontek kan daouzek-trizek. Kar, ma c'hoar, honne 'zo be douget ga' gwazed. Goude an intaraman neuze vie lavert or bedenn e krâm an huni maro, hag a vie servijet kafe d'an dud, pe or banne, me ato a vie kemert on dramenak en ti arok mon kuit. Hag an devezh goude deus ar mintin da fec'hor pe da eizhor vie an overn intaraman ha deus an abardae, ar geren a yeye d'ar vered a-gevret. Ha deus an amzar-se vie kalz kafv d'an dud. 'Vit ar gwaz 'vie graet daou 'loa kafv, 'vit an tad hag ar vamm ue, 'vit ar breur, ar c'hoar 'bla kafv, 'vit ar moerebed fec'h miz... Lakoc'h ket or c'houef brodet, a poe or c'houef kafv. Ha lakoc'h ke dilhed forzh pesort liv : dilhed du pe mouk. Egise a va ganom evit an intaramañchoù. N'e ke tamm ebet giz bremen. Bremen a zo pres var an dud da zisofñjal o zud varo. Nign a veve kalz gad ar re varo. Ha me lavar doc'h ar verione, me 'm eus be chikour ar re varo. Kar a-vechoù va ket aes dign beañ aman ma-unan hag a vouien lar deo : "Ma, pugur oc'h aet tou' kuit bremen, p'eus losket ac'hanoñ ma-un, dav ue doc'h chikour ac'hanoñ, lakar em spered ar pezh a ve ar gwellañ dign obar. " Kar memestra, pugur ma c'hoar goushañ 'zo maro er bla un ha daou-ugen, 'm eus graet toud ar vrezel ma-un, fi voar, a vie marc'hadourezh pe vie ket... Goude ma e bet achu ar vrezel e be ret dign adkrogiñ a-neve. Sevel or stal neve en-droñ...

Pa va or badian e Douarnenez, poe tri devezh da von da ziskleriñ. An tad nani yeye peurliesañ. Ma va an tad er mour, a yeye pe an ta'-kouzh pe ar vamm gouzh. Vit ar badian neuze, pe ar voeronez pe ar poeron, un a bep koste a va ar c'hoar goushañ pe ar breur koushañ e pep familh. Deus ar mare-se 'vie pakadet an huni bihen, a vie lakeet neuze var divrec'h or gomer gouzh, on amezegez ga' piv a vioc'h mat, pe ar vamm gouzh a-vechoù. Setu 'vie an tad e-kichen dougerez ar bugel hag ar poeron hag ar voeronez. Ar voeronez alies a lake or c'hoef tul troñset 'vel vit an eured, pe a-vechoù or c'hoef berr gad ar vrouz a liv hag ar chal tul du ma vie un yaouenk. Ma vie koushac'h a lake or chal brodet gad on tavañchar sei 'vel just. Drañje a vie dustu, hag a va ar giz da von da gas drañje, an tad gad ar poeron hag ar voeronez e ti an amezeien, petraman ti ar geren. Neuze a va friko bihen. Ar friko bihen 'vie graet en ti. 'Vel just vie trouzus hag alies ar vamm yaouenk 'vie gwall skuizh var lerc'h ar badian. Ae vie pedet neuze ar familh an tostañ. A vie graet neuze, soubenn ar c'hig fresk hag on tamm kig sal mat e-barzh. A-vechoù a vie graet or yar, met an drae a va dija 'vit an dud esac'h en o aferioù. Darpenn, deus an amzar-se na va ke kalz a zreberien yer. Pa vie klevet ar c'hloñc'h bras evit or badian, a vie lavert : " A ! Ganet 'zo on dreber yer !" Ae 'vie gwin var an daol evit ar badian. Hag ar poeron hag ar voeronez a gase or voutailhed huni dous hag or voutailhed huni kreñ hag or wastell. Met d'ar poeron a va kinnig an drañje d'ar voeronez. Ar voeronez na brene ket an drañje. Goude, vie dav neuze resev an dud a teue, ar c'hereñchoù pellac'h, ar moerebed. A vie graet gwin tomm, a-vechoù 'vie lakeet prun e-barzh da boaat. A pie neuze bara moulet gad amann fresk avarnañ 'vel just, ha goude a pie or bannig huni dous gad gwastilli bihen... pe huni kreñ. Met kas a reoc'h ue or prezan bihen bennak.



O ! Traoù dister... Vie ke paeet ar badian, setu ar beleg a vadeye ar bugel, hag an dud a leske or profig er sakristiri evit ar beleg hag evit ar c'hloñc'hac'h, ha d'ar vachikoted. Darpenn daou vachikot a va ato er vadian. Met ar giz a va, pa var deut en-droñ er jabarlak, 'benn neuze pa va klevet ar c'hloñc'h, a vie bugale e-leiz zirak ar jabarlak o c'hortoz ar vadian da zon e-maez. Setu vie sklapet drafije pe moni bihen... A vie sklapet dornadoù moni. Pesort emgann evit pakif daou wenneg ! 'Vel gwelar yer e pikif, e pikif an douar ! Na weler nemet ar foñsoù en aer ! Evelse 'va ar giz... Ha ma na sklape ket ar poeron hag ar voeronez gwennichen evelse, d'ar vugale, a vie kanet doc'h : "Kompar ludu ! Kompar ludu !" Kar fuloret a vien ma nie ke be netra fi voar !

Bremen 'vel just 'vit an eureujoù e Douarnenez, an drae a c'houlle kalz labour arok a vie renket mat an traoù. Setu deut... lakom 'vie an eured d'al lun pe d'ar meurzh, d'ar zadron, memes alies d'ar zadron da nouz a vie kejadeg 'ti ar verc'h neve gad an dud yaouenk. Ar botred, ar merc'hed, ar c'heren deus an eil tu d'egile evit dibabif or c'havaliour. D'obar anodegezh an eil deus egile. Ha d'ar zul da nouz a yeyom d'ar sinema 'vit obar anodegezh ato. Deut de an eured neuze kea, a va dav sevel abred ; a teue or ficherez, vie ganom or zae sei roz, glas, gwer hervez ar stumm deus om c'hij, or chal brodet du avarni, or gump gwenn, on tavañchar sei, hag or c'hoef bras, or c'hoef troñset 'vel ma laverom. Hag a noe e gwirione, ar roued a va zindan (pa vie raet or c'hoef neve) or met hantar a hirder. 'Vel just pa vie digoret ar c'hoef da vroudif, na noe ke mi an hirder-se. An tamm zirak a va graet var an tu eon, hag an daou damm a droñse, vie ranket troeif ar roued evit kowet, pa vie troñset ar c'hoef, evit kowet ar brodiri var an tu gwir. Don a rae or ficherez 'plomm ho koef hag ar chal. Hag a teue ho kavaliour da glask

ac'hanoc'h d'ho ti. Darpenn, pa pie lakeet egise ho tilhed eured, n'allec'h ke mon var ar straed hoc'h-un. Nann, ar c'havaliour a teue da glask ac'hanoc'h, hag a yeyec'h e ti ar verc'h neve. Ae a teue toud an dud tre ar vrec'h. Ha setu an dud a vie e von d'ar marc'had pe an dud a va var ar straed a zistroeie da zellar deuzoutoc'h. Var o zremm vie gwel pe a blije deo al liv pe na blije ket. Gweld a vie ! Pe 'va lakeet doc'h brav ho kouef pe na va ket. Setu nign ti an dud neve. A vie servijet doc'h or bannig traoù dous hag or wastell vihen. Benn neuze 'va fichet ue ar verc'h neve, toud e gwenn. Or vrouzh sei gwenn, or chal gwenn tul brodet alies gad an dorn. Setu vie dav en im renkif neuze. Peurliesaf 'va ar voeronez a gase he filhor da zimiñ hag ar poeron e filhorez. Setu a teue neuze ar verc'h neve, an dud a enor, ar merc'hed enor gad o c'havaliourien, alies div blac'h yaouenk 'vit ar memes kavaliour. Miac'h a verc'hed a vie vit a botred. An eil var lerc'h egile, toud or renked, goude a teue neuze an dud dimeet - hag ar merc'hed dimeet ue a lake or c'hoef troñset hag or vrouzh du alies. Ha goude neuze ar geren koushac'h gad mouchouiroù bras, mouchouiroù brodet, mouchouiroù hep tamm frañj, hervez oad an dud, hervez ma vegn ga koefol brodet pe ga koefol kafv. Toud an drae a c'hoarie. Ha zirak an dud neve a va or rustumellad bugale vihen, potred vihen ga merc'hed bihen deus o brec'h ue mar plij ganoc'h, hag or boukidig bleunioù en o dorn. Ha setu an holl dud var renk en ti-kêr. Setu a vie flapet on tammig var lerc'h, ha setu neuze diskenn deus an ti-kêr da von beket an iliz. 'Benn neuze 'va kalz tud var ar straed da zellar deus an eured e von, ha pa teue e-maez deus an iliz, kalz miac'h c'hoa da zellar deuzouto, kar alies a vie neuze ar friturioù o achuif. Setu 'vel just, 'vit ar merc'hed a vie bet er fritur, a va on tol-lagad gwelar an eured e ton deus an iliz. Me, hervez ar c'hlas a va bet en iliz, teuoc'h ket



er-maez tre ar memes our. Mag a poe ar c'hliñyar bras, mag a va on eured ar c'hentañ pe an eil glas a teuoc'h tre an our vras an tal er-maez. Ma poe on eured deus an trede klas, a dreuoc'h don er-maez tre an our goste. Bremen a yom neuze beket an ti friko plec'h a vie neuze bouch ar verc'h neve. Neuze vie ket er sakristiri ar reuz, a vie en or von d'ar zal. Ha neuze pep huni a glaske e blas e-touez an doliou, kar na vie ke bilhiji var an asied, pep huni a yeye, 'vel just ar re yaouenk a-gevret, met ar re gouzh a yeye hervez an anodegezh a va. Daou vañjar a vie. Ha setu goude ar mañjar kentañ, a teue an eured adarre var droad da von var an aod d'obar or bourmenadenn ma va brav an amzar. Hag alies, en or ziskenn straed Santez Elena, matreze vie ke re vrav, a vie kanet en or dremen zirak ti ar re Dafze :

E ru Santez Elena  
tilibi tilibi tilibi tilibon  
E ru Santez Elena  
zo teiar zorserez  
tilibi  
zo teiar zorserez  
Ha 'mañ Soazig an Dafze  
tilibi tilibi tilibi tilibon  
Ha 'mañ Soazig an Dafze  
Hag he c'hoar An-Mari  
tilibi  
Hag he c'hoar An-Mari  
Hag o breur Teofili  
tilibi tilibi tilibi tilibon  
Hag o breur Teofili  
zo e von da zimif  
tilibi  
zo e von da zimif

... Ha noe morzhadoù kaletac'h 'vi maen-dailh ?  
M'eus ke choñj deus toud ar pozioù. Pe ar cheorenn a noe morzhadoù kaletac'h 'vi maen-dailh ?

Setu a teuyom en-droñ d'ar zal neuze, hag ae alies neuze a vie on tammig dafis, a teue or soner gad e drompil, a vie on tammig dafis da c'hortoz mare koan. Met arok mare koan, pep huni a teue d'e di, hag ar merc'hed a jefche alies brouzh. Hag ae vie lakeet or mouchouar tul brodet gwenn mag a va an hafv hag or boutou gwenn da von d'ar bal. Setu en-droñ a m'in gaier e ti ar verc'h neve da von d'ar bal. Setu pa groge ar sonerezh, 'benn neuze ar re koushac'h a noe kemert o vlas var ar c'hadorioù 'vit gwelar mat ar c'horoll. Setu an dud a raie teiar dro d'ar zal, hag an dafsoù a gomafse tre ar polka, goude a teue ar mazurka, hag ae ar mab neve a gemere ar plac'h-enor hag ar pot-enor a gemere ar verc'h neve. Potred an eured ue neuze a raie d'ar merc'hed dafsel an eil var lerc'h eben. Ha pa achue ar fritur, da unnek deus an nouz, merc'hed ar fritur a teue d'ar poulailhe d'obar on tol laged. Vie tennet ar boutou kokot hag a teulier var ar choçonoù da zafsal. Hag ar giz a va ue neuze, vie or vaouez gad he fanar, 'vel or panar amann e verzhiñ gwastilli. Setu an dud 'va en eured a baie or wastell d'ar re va deut d'ar bal. Or voerob kouzh dom, ar voerob Barba, honne a verzhe e Pouldeuilh, hag a teue potred Pouldeuilh neuze da glask panar Tan Barba e ti ar patisar e-kichen om zi, setu a teuen da vèlar ar voerob, pugur a vegn deut da glask ar panar. Tan Barba 'va kroget da zon kouzh, hag an drae 'va pell dei don ha dougen he fanar, setu moused ar yon Fañch a teue neuze, a vegn pem faec'h e ton... N'ouzoñ ke e pesort stad a yeye ar gwastilli e panar Tan Barba da veañ gwerzhzet an de goude... Vie kalonoù pichoned, pomme...

Da zigoriñ ar pardonioù, d'al Lun Fask a va pardon ar Yeuc'h. Toud ar yaouenkiz var-zav. Bandennadoù merc'hed,

bandennadoù potred. Setu digouet er Yeuc'h. Dav 'va mon da velar diaoul ar Yeuc'h. Be' va stalioù madigoù, gwastilli, c'hoarielloù, ha me voar me ! Setu pep huni a brene ar c'hoariell a blije def. Met or bla, ti an Otrou Maer, a va Per Keroulaz, en ti-se vie graet frikoioù 'vit an eureujoù. Setu ostaliri a va, setu 'vit ar pardon a vie graet ragot. N'ouzoñ ke pera va c'hoarveet, va deut on tamm chikan bennak etre potred Douarnenez e ti an Otrou Maer. An Otrou Maer noe fallet def lakar peuc'h, fi voar potred yaouenk trivac'h 'loa ugef 'loa, on tammig reuz a va deut, met un bennak noe tanfoultret an Otrou Maer hag an O. Maer a va kouset azeet er gotar ragot 'va e korn an oaled. Toñtoñ Nol va en o zouez hag ar re Keineg... On tammig dispac'hadeg 'va bet, hag an O. Maer noe douget klemm pugur 'va be feuket.

Ar pardon a zarre ar pardonioù a va pardon San Vandal. Lavert 've deuzoutañ e ar pardon var e goste... P'eus ke choñj or vech a vam aet da Gervern, pugur aet a vam gad ar c'harr boutin ha deut en-droñ var droad ha troet neuze e Kervern a vam aet da velar an intron gouzh, pugur fi 'zo be maget ga laezh Kervern... Choñj a peus ? Met a-hed ar bla a vie pardonioù all. Pardon Intron Varia ar Gergoad, Pardon Santez Ana. An devezh-se, Douarnenez va or qér varo. Veloc'h den er straedoù nemet or bolomig kouzh bennak n'alle ke mi e ziviskar dougen ane da von beket Santez Ana.

Gwir e a teue charbañioù deus toud ar vro Vigouden var ar blasenn, a vie fermet or charbañ, ol lantik a teue. Ha setu a yeye tri en a dreñv ha daou zirak gad an den a gase ar marc'h. Matreze a teue miac'h vit ugen charbañ, surtoud deus koste al lantiked. Toud ar c'harrdioù a va gollo d'an devezh-se. Ar re a yeye var droad a yeye neuze tre an hen treuz, tre an aojoù. Ha fi voar an henchoù ae a va strizh, setu va ret gotoz ho tro da ziskenn beket aod



Homen e ar Flimiou... Hag ae e Porzh Kad... Bremen yer var droad d'ar Flimiou!... Ae vie lakeet ar zardin da zec'hiñ var an traoù koad. Gwel a rit mañ ar merc'hed ae e lakar ar zardin da zec'hiñ...

Traezh-Malaouenn. Ral a va a va dichal da von deus Ri beket Santez Ana, nemet neuze a vie mour bras. E naontek kan trizek, me va aet ga ma c'hoarezed, deus ar mintin rankoc'h mon kuit var dro eizh or da von var droad. Ha setu e-pad an overn bred, ken moe klevet or vouez e c'halv ac'hanoñ, pa moe sellet, a va mamm deut ue, noe achu he labour, hag ar mour a va ijel tre setu noe tennet he boutoù hag he bazoù er Ri, hag aet beket aod Santez Ana var an traezh. Or prosesion 'va aet deus pep parez. An eskopti a-bezh a va e Santez Ana. Ha deus an nouz a teuoc'h d'ar gêr, ha oac'h er gêr var dro navor 'benn neuze vac'h er Ri. Don a rae potred Plougastel Daoulas, potred deus tu ar Folgoad gad or vazh en o zorn, var droad. Ma c'hoarezed dign a yeye da bardon Intron Varia Rumengol da zulvezh an Drinded, a yeyen var droad deus Douarnenez. Ma c'hoar henañ 'zo bet on ugen kwech bennak e Rumengol var droad. A yeyen kuit d'ar gwenar vintin hag a arruen e Rumengol d'ar gwenar pemor, faec'hor, hag ign a rae o fardon d'ar zadron. Ha d'ar zul vintin a gemeren an hen da zon d'ar gêr. Met ar pezh a va ar gwashañ gato a va treuzif e Roznoen. 'Ranken treuzif ar red dour ae. A-vechoù vie kreñ ; setu an treizhour a ranke diskenn da glask plec'h a va an aesañ defñ treuzif. Ma c'hoar henañ a va ato spontet da dreuzif e Roznoen. Bremen 'vel just a yeyer ga' kirri...

An Ened e Douarnenez e bade tri devezh. Ar zul...  
O, pavar devezh a bade... Ar zul, al lun, ar meurzh hag  
ar merc'hiar. D'ar zul neuze a gomafise an dud don var ar  
straed gad maskloù. Be va a bep sort traoù... Ar botred  
a va tuet tre da von e merc'hed. Tou tud kêr ha tou tud  
divar an aod, divar ar glazenn ae, tud Penn ar C'hoad, tud  
ar Gerneve a teue da Dal a' Groaz, pugur, koulz a lavar  
ar miaf a vie a re digized a va var an hen neve, deus âman  
beket Sal de Venise, du-se plec'h 'mañ R.D... Ae 'zo or  
zal vras en a-dreñv, hag ae ue gwechall 'vie frikioù  
eureujoù. Ha setu ar re masket a dremene dre ae, hag an  
dud a bourmene kea pa va brav an amzar, familhoù, bugale,  
setu ar maskloù e redek var lerc'h ar merc'hed a-vechoù  
'vit fallout pokif deo, setu vie cholori, chouadeg. Bugale  
hag a noe aon deus ar maskloù hag a vleñje. Setu deus an  
nouz 'vie bal er zal-se petraman er c'hui. Er c'hui vie  
bal ue. D'al lun 'va memestra, d'ar meurzh 'va an devezh  
bras, met d'ar merc'hiar, d'ar merc'hiar ludu, neuze a vie  
graet krampouzh, ha penn 'a benn an hen âman a va staliou,  
ha vie graet krampouzh var an hen ae, krampouzh tomm. Toud  
an dud a zrebe var ar straed. Anveet mat am eus or baraer  
deus Penn Ar Pon hag a va mest-dispar d'obar krampouzh.  
Ha var an trotoar vie feyet tan, hag ar bilig var an tan,  
ha bec'h dei ! D'ar meurzh a vie on eured, a vie fichet  
ar verc'h-neve, gwel' peus eureujoù, kalz tud en eured  
'vel just. Toud gwiskamanchoù tro dro, un deus Lokorn,  
un deus Poulann, toud an dud-se va en eured. An dra-mañ  
neuze, an Ened kouzh, gad mamm 'm eus klevet an drae, vie  
tolet an Den Paoulig er mour.

" Son ar biniou hag an tamboul,

Tol' ar Mardi Gra e kreiz ar mour "

Met henne 'vie kaset beket ar mour ha var e lerc'h a va  
tud gad mantele e yudal def. Vie lakeet manteletoù d'ar  
botred kea, hag a va or c'hañv bras d'an Den Paoulig da

von da dolar ane e penn an dik. Darpenn d'ar yaou arok  
an Ened a teue dija an Den Paoulig e-maez. Pep karter a  
noe on den paoulig gad or rustumellad bugale var e lerc'h  
da bourmen e tro kêr. Ha vie or gastolorenn kouzh pe or  
poud kouzh neuze ga' div vazhig koad da skeif avarno ha  
da ganif neuze : "An Den Paoulig, An Den Paoulig Mardi  
Gra !" An drae 'va Den Paoulig pep karter gad ar vugale.  
Met huni ar merc'hiar ludu a va neuze huni bras ar wazed.  
Ar merc'hiar ludu, toud an dud a va digizet. Friko a vie.  
Vie on tamm mellgwadeg, rost-hoc'h vie graet, ha vie bara  
gad anis. Ha d'ar zadron arok neuze, a vie pres evit kowet  
gwad-hoc'h evit obar gwadigennoù. Pep familh a rae  
gwadigennoù, ha neuze fars gad prun. An drae a va al  
lipadenn e-pad an Ened. Gwadigennoù, rost-hoc'h ha fars  
gad prun. En dey all, 'm eus ke choñj pera a vie c'hoa  
e-pad an Ened. Choñj a ra dign e an drae tre vras ar pezh  
ma vie. Ha goude, duvetac'h, goude ar vrezel pavarzek, pa  
e be kroget an Ened en-droñ neuze na va ke tre memestra.  
Neuze a vie koroll en otalioù. An drae va miac'h borc'hij.  
Ya. Met, be zo be da m'in zigiziñ traoù ga kalz ijin.  
Or vech pa e bet ae brezel al legestr, pa falle da botred  
Douarnenez mon d'ar Martinik du-se da besketi, pa va lakeet  
ar c'hanol da denn' avarno, dustu an Ened goude a va bet  
doare al legestr. Varlene va bet... Potred Kempar a va  
deut a-enep an traoù atomik. Ha vegn be kaset da di ar  
polis ! Yao ! Vegn be trapet var an hen pugur a va or  
pesk gato va mi ken an dregn !... Ha gwir e, ma ve tolet  
an dour tomm-se er bae ae e kollet ar beskerezh. Setu  
an dour tomm-se er bae ae e kollet ar beskerezh. Setu  
vegn be kaset da di ar polis ! Añfin ! O, ya, ar polichen  
a noe labour avac'h ue e-pad an Ened, darpenn chom a rae  
tud vev a-vechoù var bordig an hen...


Ar familh B..., ha N. Roquevert va un deuzouto a va deut da Zouarnenez gad ol letern-majik, plec'h vie gwel neuze skeudenoù, hag an drae brasae aneo. Ha choñj am eus bugel, be' bet el letern majik ha moe gwel neuze istor "La bande à Bonnot". Setu ar familh-se neus kendalc'het da zon da Zouarnenez ha deut gad or c'hoariva ambulan, or vech a vien en or vro, or vech a vien en or vro all, hag a jomen memes e-pad meur a viz e Douarnenez. Ha deus an drae neus be kemert duvetac'h or zal d'obrar sinema ; 'vel just an drae va Sal de Venise. An intron B... a va or vaouez bras, on tammig on archer, ha pa zae reuz tre ar voused e strad ar zal, a noe or fouet charretour, hag a rae skoeif he fouet da spont' ar botred evit lakar urzh. Hi nani 'va er c'hes. Met den n'alle ke stranikaf netra. Neuze a vie filmoù hir, gad epizod... Ha neuze ar merc'hed pa m'in gayen an de goude er fritur, ma c'hoar 'va neuze el labouradeg bouestoù gollo, ha setu ol lun a va deut un da gontif on epizod. Leun a vie ar zal peurliesañ. Hag ae 'va ar reverber duveyañ deus Douarnenez. Beket ae a yeye ar botred hag ar merc'hed da bourmen deus an nouz, deus Tal a' Groaz beket ar reverber. Ha lakepoted a va a dorre ane aliesac'h 'vit e dro kea...

V.

AR BREZEL PEVARZEK.

Tre ar gazetenn va gouet va kroget ar vrezel pavarzek, ha deus an amzar-se a vie an tamboulin e kêr, hag a va deut da Dal a' Groaz da lavar a va kroget ar vrezel. Setu dustu ar botred a ranke mon kuit 'va m'in zaet. An holl botred va en oad, toud ar vicherourien. Ar friturioù 'va chomet etre daouarn an dud oajetac'h, petraman tud mac'hañgnet na vegn ke mat 'vit ar servij hag ar merc'hed ue n'eus labouret gad ar wazed er friturioù 'vel var ar maez. Koulz a lavar 'va aet toud peizantbed var ar maez kuit, hag e kalz kêrioù toud al labour 'zo be graet gad ar merc'hed hag ar vugale. Ha 'vel just an dud a m'in chikoure, memes arok ar vrezel. Peurliesañ vie teiar, pidir gêr a-gevret oc'h obrar al labour. Hag an holl tiegezh a yeye deus on ti d'egile. 'Vel just neuze a vie ar peurzenn, devezh duveyañ al labour, a vie graet krampouzh gwinizh. Goude, pa e bet aesaet an traoù a va graet kig. Ae 'va friko bras evit toud an dud. Pep kêr a rae or peurzenn. Ha choñj am eus, ar mekanikoù dornañ a vie troet ato ga' kezeg. Hag ae, n'e ke ken tud ar gêr a va, me mousigoù Douarnenez a va kenelied da botred ar c'hêrioù-se a yeye... Ma breur a yeye ato da Gerlouarneg pad eizhte lojet ha maget. Ha vel just, ar voused a vie ue er peurzenn. Labour 'vie kaet deo forzh pegemen da obrar, da zispakif neuze ar pakadoù id... Sur avac'h a vie c'hoarriet on tammig ue. Me, benn an nouz a vien skuizh maro. Al labour

a groge abred deus ar mintin, ha deus an nouz keit ha ma jome sklaer awac'h. Darpenn, be rankar obar buen rak blavioù a va hag a va fall an amzar hag a va diaes tre kowet sec'hour awac'h evit obar an eost. Pep bla a jafiche an huni a groge. Vie ket ato ar memes huni a groge. Setu pa va fall an amzar, an huni a zigoueye beañ an huni duveyañ, a-beñ vie duveet arok va tu da achuif. E kêr, al labouradegoù a m'in zifrete ue da von varok. Pa e achu ar vrezel va deut an tamboulinar e korn plasenn Tal a' Groaz evit lavar a va achu ar vrezel. Hag ae, ar c'hluñyar a noe sonet. O, choñj am eus deus an devezh-se. D'an unnek a viz du, an amzar a va kaer, soup an amzar. 'Benn an nouz a va an holl dud var ar straed, renkad ha renkad neuze gad leternoù papar, ha da ganif neuze. Nemet ar re a noe kollet o zud a va taer evito kleout kemen a levenez var ar straed, pugur o re deo na vien ke be deut en-droñ. Al levenez-se noe padet 'pad eizhte pe pemzete. Met da achuif 'va chomet kalz tud klañv gad ar grip. Noe paket terien en o redek er vrumachenn deus an nouz. Er blavezh-se 'va bet or grip spontus, a zo be maro kalz tud. Tud a bep oad. Ar midisined a va var-zav nouz ha de, e von da velar tud klañv. On distruj spontus 'zo bet er gwraged yaouenk a va dougerez : a gollen o buhez hag huni o bugel ue. Ha goude, chiwazh, pa va deut ar botred d'ar gêr en-droñ a vañke kalz tud. Pa vie un maro er vrezel, peurliesañ ar c'helou a teue tre or c'hentiel def a noe gwel ane e vervel, pe tre tud ar vro a teue ar c'helou beket ar familhoù. Ha loud deus ar wazed-se n'eus ket allet lavar morse pevare ign be laet. Pa teue ar gompagnunez en a-dreñv en-droñ, na gayen ket hemen pe henne, setu vie klask etrezo deus ar re ar memes korn-bro da c'houlenn : "Te t'eus ke gwel an hemeñ-nen ?" - "Em c'hichen a va, goude n'ouzoñ ke da bera e deut. Met n'e ke deut en-droñ ; sur awac'h e chomet..." Setu pa teue ke kelou va gloazet



164 DOUARNENEZ

Scène du Port

Setu ar c'hal savetaj... Darpenn ar vag savetaj a riske ae penn a benn... Set' ae or gravezh-daou-bennek! Ae zo nouejoù sardin prest da von var ar gravezh. Or gomiserez bennak 'zo e preniñ ar c'hesoù sardin ae.

an dud deus on ospital bennak, setu va chomet var an dachenn diano. Korfoù ar re varo 'zo be digaset, loud, ar re 'va tu da c'hout piv a vegn, met kalz a zo e bered Douaumont pe e berejoù all Soudarded. E pep korn Bro C'hall a zo Breizhiz douaret. E pavarzek 'zo deut kalz tud deus Bro Beljik pe deus Norzh Bro C'hall, repuidi e Douarnenez. Choñj am eus 'va deut memes toud on ospitaliad re gouzh, a vegn be lakeet e ti Katrin Ar Zal. Tud kouzhig-kouzhig a vegn, ha kalz deuzouto zo be maro ganom. Goude ar vrezel, pugur a va be dismantret toud Norzh Bro C'hall, kalz gwazed 'zo aet, mafsonerien, toererien, ferblantourien da labourat en Norzh da zevel adarre an tired. Goude pep huni zo deut en-droñ d'ar gêr. Goude ar vrezel 'zo be kalz dimeziol e kêr, pugur ar botred va aet kuit arok...



VI

REUZ AR BREZEL.

Pad ar vrezel, Flañcheg a va be dispūnet - maro e  
e Deportasion memes - hag un deus ar c'huzul neuze va be  
lakeet vi maer. Setu noe graet vit ar gwellañ 'vel just  
'pad ar vrezel. Achu ar vrezel 'va be toullbac'het pugur  
- e geren 'va be toullbac'het gad an Alamaned, hag hemen  
va be toullbac'het gad ar Rezistañs - pugur va bet  
kolaborateur. Vit beañ mat, sur awac'h nie ranket  
Douarnenez chom hep maer ebet. Met, pesort reuz neuze  
d'al liberasion, chiwazh ! Setu ma va lakeet neuze tud  
ar rezistañs da gas kalz tud en toull. Loud darpenn vegn  
be kolabo, pe vie kasoni deus un pe deus un all, toud an  
drae vie kaset d'an toull. Ha dreist holl an dud a va  
a-du gad ar brezhoneg ; ar re-se va, o, touet ! Merc'hed,  
potred, a teuen deus ar mintin da bem or en on ti egise da  
lavar : "Me harzh ac'hanoc'h, fi rafk don da di an archerien."  
Setu teue un, teue un all, an dud 'va souezhet pa m'in  
gayen ae, komersanted, medisined... M.G... pugur a noe  
graet kentelioù brezhoneg... Setu n'ouzoñ ke tre pesort  
burzhud na ven ke be harzhet. Lavert va dign gad un bennak,  
o, ya, moe ken m'in c'hotoz, sur awac'h mie rafket mon ue  
( 'vel just, kar gwall gomprometet a vegn, kea ! ). Mat,  
pera jome da obar, ( o, vegn ke be follet gad an drae ) obar  
ma zammig valizen ha m'in renkiñ... Me joñje : "Ma, mag a  
teuion da glask ac'hanoñ, m'o ken kemer ma fakad, ha tizh  
kuit." Setu toud an dud, ma anodegezh harzhet. Loud deus

an dud 'va be kaset da Roazhon. Ar re va bet harzhet ar  
c'hentañ, lakom ar re noe be labouret gad an Alamaned, ar  
merc'hed noe pourmenet, plijet d'an Alamaned ha me oar me,  
'va be kaset en on ti e-kichen an iliz. An ti 'va gollo,  
hag ae 'va or jardin vras setu d'ar zul, o, marplij ganoc'h  
a vegn diwallet ga daou FFI var an our, setu d'ar zul a va  
otre da von da velar aneo. Me 'zo be meur a zulvezh o  
velar F.T..., ha merc'hed yaouenk all a gayen ae ha na  
ouien ke memes a vegn be harzhet. Setu ae memes 'm eus  
graet anodegezh deus tud all, deut deus a lec'h all, pe  
deus Ploneve pe tro-var-dro. Dav va lakar aneo on tu bennak !  
Goude, an dud-se 'zo be kaset da prison Kempar. Setu dav  
'va neuze da re Douarnenez mon neuze da Vesgloagen da gas  
deo dilhed pe da gas deo on dramenak. An drae n'eus padet  
michoù ha michoù. Ha loud all, ar re va bet harzhet duvetac'h,  
ar re-se va be kaset dustu da Roazhon. 'Vel just 'vit an  
dud-se n'eus ke be kaet abeg morse deuzouto. Me, prosez va  
be graet deo 'vel just. Ha Y.E... 'va e Kempar, setu noe  
rafket kemar breuterien. Setu 'vel just ar breuterien a  
c'houlle gato kowet on testeni gad tud a anveyen, mat da  
lavert noe ke graet netra direizh. Ha setu me goulennet  
da von da di ar polis 'vit Y.E... Setu va goulennet ganign  
bep sort traoù : pera vouien deuzoutañ... Alies, ar pezh  
a c'hoarveye gad an dud pa falle deo difenn ar re va en  
toull, e lec'h difenn aneo, a sanken aneo e-barzh ma lavaren  
re a draoù... Setu goulet va ganign siniñ. Hag en or siniñ,  
me a joñje : "Ma, m'of e lakar ma ano aman e-traoñ on dra  
droch, ken e droch awac'h..." Sur awac'h va ke ken fall-se  
ar pezh moe lavert pugur va be lennet an testeni-se gad ar  
breuteur er prosez. Met diskouelt a vioc'h var an hen, kea !  
Ha selloù du ! O, an drae n'eus padet pell ! Gwir e va  
be lennet deus lae ar gador ol lizher deut deus an Otrou  
Duparc. Setu 'vel just an dud a yeye d'an iliz a va kondaonet  
en añañs mag a noe menzioù breizhat. An drae 'zo sur.

Ha nign noe douget an toaz d'ar forn, 'vel ma ve lavert ganom. Met an drae n'eus ke lakeet ac'hanof diaes da gousket deus an nouz ! Pera raie dign an drae pera a lavere an dud ? E penn kentañ ar vrezel va maro ma c'hoar henaf var lerc'h or c'hleñved hir, setu pa e bet achu ar vrezel, va ke kalzig a varc'hadourezh da verzhif, met m'eus ke graet trafig morse evit gwerzhif kerac'h ! Setu vegn ke pinvidikac'h, er c'hontrol, paoulac'h a vegn pugur ar pezh a moe, noe ke mi kalzig a dalvodegezh. Hag or vech 'm eus respontet d'an Otrou K... "Pera fall doc'h, mamm n'eus saet ac'hanof re zivalo evit bevif or sort amzar..." Pugur me vouie ue, pa va deut ar vrezel noe graet on tammig trafig ue, on tammig trafig gwin gwenn, n'ouzof ke pera...

VII

FRITURIOU, MISTRI HA GREVOU.

Meur a vech 'vel just 'zo be grevoù gad ar vartoloded e Douarnenez. An devezh a teuen en aod, n'allen ke gwerzhif o fesked, pe ar prijou a va ken dister ken na c'honeyen ket o boued. Setu evit obar d'ar borc'hichen plegif, a vie tennet ar merc'hed deus ar fritur. Setu ar wazed a yeye da dennif ar merc'hed deus ar fritur evit ma vie be chomet al labour var an dolioù, 'vit obar d'ar vistri plegif, vit obar prij er pesked. Fañch Al Laged, a na va anveet nemet zindan an âno-se, Fañch Stefan e âno a va on den eon, hag alies a gemere penn ar reveulzi. Setu 'va anveet mat. Pugur vie er c'hui ar bodadegoù, vie saet on estrad, setu deus lae an estrad-se, Fañch al Laged a raie prezegennoù. Gout a raie pera a lare, ha gout a raie pera a c'houlenne e âno ar vartoloded all. Alies, an drae n'eus padet sunvioù. Ha chiwazh, an drae a zigoueye a-vechoù pa yeyen en-droñ d'ar mour, pugur na va ke be maget ar sardin e-pad meur a zevezh, a fei, a va dav adarre redek tre ar bae da velar e pesort korn vegn en im guzhet.

Hag en amzar-se ue, pugur ma zad a n'eus be desket ar vichar soudar bouestoù vit lakar ar sardin, a va bet or grev bras pa va deut ar mekanikoù da zoudif ar bouestoù, setu 'va reveulzi e-touez ar vicherourien, darpenn an drae a golle deo o bara. Setu noe graet grev. An drae noe padet meur a zûn, mes on devezh kemese, fuloret ar zouderien, un deuzouto a noe pignet var toenn ar fritur gad or c'hleron

da zonif. Hag ae, holl a vegn aet er fritur, noe puntet var an ourioù da vrevif ar mekanikoù. Loud, ar botred a va bet var an doenn a n'eus rafket obar prison. Deus an amzar-se a va an Otrou Delecluze a va maer e Douarnenez, hag eoñ a va ue mest or fritur, deoñ a va memes. Setu ar friturioù plec'h a va be torret ar mekanikoù zo be paeet gad tud kêr, ga' tailhoù neve lakeet var an gomer-santed. Anveet 'm eus ue an O. Pennaroz, maer e Douarnenez. O, or polkez den, mat da verc'heta ! Senatour memes e bet. Ha chofj am eus, michañs pa va bet anvet da vaer, be va bet d'obar or vizit da skoul ar seurezed, ha noe goullet gad an dimezell piv a va ar plac'hig-se, deuzoutof. N'ouzof ke perak. Setu va displeget deoñ piv a vegn. Ha ya, anveout a raie darpenn ma zad noe labouret en e di. Memes, a yafen pellac'h, ma zad pa va be dimeet e c'hoar (c'hoar Pennaroz) a va bet e servij d'ar soirée. Neuze na va ke c'hoa soudard. Hag en hafv, deus ti Lavanaf, ma zad a vie distaget deus al labouradeg-se da von da Manar Lak ti ar re De Rochefort evit an hafv, darpenn an Otrou -se a va notar e Pariz hag a teue ae e-pad an hafv hag evit kas ar c'harr da Gempar, a ranke kowet un bennak ato zindan e zorn. Hag a va daou varc'h. Un a va Jean Bart, egile 'm eus ke mi chofj... Ha setu bemde evit kas ar c'hourie da Bariz, tud a yeye gad an otrou-se d'an daou lamm da Gempar da gas al lizhiri ha da gemar ar journalioù a va deut. Hag e-pad ar michoù hafv a vie ae. Ha darempredoù mat a va etre an dud-se ha ma c'heren kar ar mab ae a zo poeron d'or breur henañ dign. Met an drae a va arok nie desket ma zad ar vichar soudar. Dimeet a va or blavezh bennak a va pa e aet da obar ar vichar-se. Er fritur n'eus desket e vichar soudar. Or vichar vat a vei hag ar re a noe desket anei yaouenk tre a va 'vel just blivac'h a c'houneyen mat, met er goñ ue na va ke labour evito. Or faer a va gato hag or vazhig sten en o dorn ha gad ar faer



142 DOUARNENEZ - ÉTABLISSEMENTS FINE DÉTÉS. - LA GOUPE DU THON. - LL

Ae megn e troc'hiñ toñ! Ae va on tamm arok d'ar saro,  
ha vie sec'het an daouarn e-barzh... Allas! Homen e  
Soaz Bordeneg! Honne 'va komiserez...

a raen teuzif ar sten penn 'a benn ar goló. Pugur ar golo nani vie lakeet... Ar vouest vie karget tre ar fofs, tre ar strad. Ha goude vien bouilhotet, lakeet da virvif, ha ma vie on toullig er vouest, a feye, setu an drae vie bouestoù kollet. En hafv, pa vie kalz sardin, a laboure an dud koulz a lavar nouz-de. Ar zouderien a rafke be kaset deo o c'hoan deus an nouz pugur a labouren alies beket unnek or-hantar nouz da grogifi en-drofi deus ar mintin matreze da faec'h or ma vie prest ar bouestoù. Hag ar merc'hed ue kreiznouz d'ar gêr. Ha deus an amzar-se an holl a noe bouteiar-koad, setu pa vie daou-ugen, hantar kan maouez a-gevret hag ar wazed e ton deus ar fritur, tout kêr a dregerne ga' trouz ar bouteiar. Me a gleve an drae mat-tre, nign a va e chom e Tal a' Groaz, setu an holl da von pe var du Treboul pe var du Ploare a dremene tre kreiz kêr, 'vel an akipachoù pa teuen ue deus ar mour. Ar boutoù koad 'va tachtet, setu an drae a rae miac'h a drouz.

Goude 'zo be c'hoa grevioù all ; ar grev bras zo bet e-pad sunvioù ha sunvioù evit goull pem rael an eur. N'ouzoñ ket hag-eoñ na va ke pavar rael, hag evit kowet pem kweneg miac'h, an drae noe padet michoù. Me, goude memestra pa e be kresket er c'hêrioù brasac'h evit ar vicherourien, Douarnenez zo bet aet da heul. Choñj am eus e velar potred ar vaneuverien azeet e Tal a' Groaz, pugur ae va an emgav evit an holl arok mon da labourat, ha pa vie or grev, e Tal a' Groaz nani teue ato an dud da m'in vodiñ, azeet var bord ar riblenn e c'hotoz or c'heloù bennak da zon. Hag an Otrou Beziers o tremen, hag ar chouadennoù e von var e lerc'h, hag eoñ e tremen sec'h 'vel or piler en o zouez. Un deus ar botred Beziers. Henne noe lavart ue : "N'allign ke chom pell e grev pugur na ram deo ken nemet trawac'h da zribif bemde, n'allo ket ar grev padout pell."

Met deus an amzar-se va ke dru ar geusteuenn e ti ar vicherourien. Toud an dud-se a laboure er fritur a zebre o legn, o, n'e ket en on ostaliri, met er c'hui ! Pa vie achu ar marc'had 'vel just a jome ar skabilli plec'h a vie bet ar merc'hed azeet 'vit gwerzhif o amann en diabarzh deus ar c'hui, hag an dud-se a teue d'ar c'hui da zribif. Pera ? Fourmaj euilh, pastez gad on tamm bara sec'h pe matreze on tammig amann avarnañ, met er goñ neuze a vie kaset deo soubenn deus o zired. Hag a velen an dud o ton deus Pouldeuilh, deus Treboul gad or poudig ol litrad apeupre, soubenn tomm, hag er goñ vie lakeet on tamm flanel en-dro d'ar poud vit ma na nie ke yenet ar zoubenn. Hag ar merc'hed-se a teue bemde bemde da gas da zribif d'ar c'hui d'ar wazed. An drae nani va pred micherourien Douarnenez e-pad ar goñ pa labouren er fritur. En hafv 'vel just, ign a gase gato boued yen, met er goñ a teue ar poudadoù soubenn tomm hag ar paner deus ar vrec'h all neuze. Sur awac'h da evañ a va on taked dour bennak deus ar feunteun a va e-kichen ar c'hui. Deus an amzar-se na vie ket anveet ar gwin deus tol. Ha neuze, an dud na vegn ke pinvidik awac'h da brenif gwin forzh pegon marc'hadmat.

Er goñ, pa vie ke labour evit ar zouderien bouestoù er friturioù, kalz deuzouto, ar re yaouenk surtout a yeye da vro Portugal da zoudif bouestoù, ha da zeskiñ sur awac'h da re du-se penos a vie graet aman ar bouestoù evit lakar ar pesked e-barzh. Ha be ign bet ue er Marok e-pad ar goñ hag a teuen en-droñ neuze a-benn an hafv pa groge adarre ar beskerezh e Douarnenez. Mon a rayen ue a-vechoù e-pad an hafv memes pe da Vel-Il... Darpenn, borc'hichen Douarnenez noe friturioù on tammig e pep lec'h var koste ar mour. Penn 'a benn ar c'hoste a noe friturioù. Tamm ha tamm ign be koueet an eil var lerc'h eben.

An holl dud a laboure er friturioù a achue da greiste hag a groge en-droñ en o labour da on or. Setu,

ar re va memes er Stafkou Don e chom noe ket amzar da von d'ar gêr var droad, da zon en-droñ, setu perak a teue ar merc'hed gad o foud soubenn pe o fanar da gas deo da zribif d'ar c'hui. Deus an amzar-se a vie labouret duveet er friturioù pad an hafv, ha deus an nouz var dro nav or matreze a vie tri-ugen dek-ha-tri-ugen maouez deus an daolioù ambouetif giz ma ve lavart, pa ve lakeet neuze ar pesked er vouest - ha var dro nav or apeupre pe on tammig arok a groge un bennak da ganif pedennoù an nouz. Hag an holl merc'hed a gane gourc'hemennoù Doue, an drae a bade matreze on hantevor ar c'han. Hag an drae a dregerne... An dud a dremene da von da bourmen var an dik a jome da chilow, kar memestra a va kaer klevout kemen a vouechoù. Ha merc'hed Douarnenez a gane brav. Mouechoù skiltr a n'eus, mouechoù uhel. Glebor ar mour na rouilh ket o mouezh. 'Vel just 'zo bet kalz grevoù e Douarnenez. Hag alies ue er goñ pa vie ke labour, a vie poan e vevif memes vit ar zouderien, vit forzh piv a laboure er friturioù. Me, ar grev bras 'zo bet neuze er bla pem-varnugen. Ae va an holl friturioù e-maez vit goulenn pem rael an eur labour. "Pem rael a vo ! Pem rael a vo !" An drae a n'eus padet michoù. Setu 'va deut ue kea prezegerien deus a lec'h all, da lavar d'an dud va dav m'in sindiki. Tillon, Flancheg... Vie prezegennoù bemnoz er c'hui. Hag evit achuif neuze vie kanet an "Internationale". An traoù memes a va aet fall tre. Potred ar friturioù noe digaset potred deus lec'h all da labourat. Hag on nouzvezh a va be tennadeg bolodoù e Tal a' Groaz en on ostaliri va just er c'horn. Flancheg va aet or boled en e gouk. Holl tud kêr va e Tal a' Groaz. Deut ar jañdarmed var varc'h. Setu an dud a skarzhe en trepasioù en tired a gayen c'hoa digor, pugur ar c'hezeg a teue var ar riblennoù. Or gwir revolution a va. Douarnenez noe kemert 'vel just ano "la ville rouge". Me, ret e anzav memestra e deus an devezh-se e be kemert Douarnenez 'vel

or vro hag a va kalz tud e labourer er fritur. Chiwazh, aboe e kemmet an traoù. Matreze deus an amzar-se 'va on tregon fritur bennak e Douarnenez, hag a labore... Ha pera 'jom bremen, div, teiar, pidir, pem fritur d'an hirañ. Be' va ue friturioù bouestoù gollo. Carnot a va deut ar c'hentañ 'barzh Douarnenez. Ha goude 'zo be saet un ae var an aod gad ar Chancerelled, zo be braseet, aet deus tu ar gar d'ar vered du-se, ha memes n'eus braseet c'hoa, hag aet on tamm deuzouti da Gempar. Ha Douarnenez, tamm ha tamm 'zo be koueet he labour, teue ke traoù all. Hag ar pezh a zo c'hoarveet, ar vartoloded na besketen ke mi ga rouejoù gist arok. Setu an tired a raye labour var ar rouejoù d'ar merc'hed, hag ae va kalz merc'hed e labourat var arrouejoù, zo be neubeutac'h a labour. Ha bremen, ar porzh n'eus ke kalz a drafig bagoù ennañ. Ar wazed a teu da verzhiñ o fesked da Zouarnenez a glemm ato e marc'hadmatac'h ato. Ar c'horbellerien na lakon ke prij e Douarnenez 'vel ma lakon e Konk pe en Orian. Gwir e ue, deus amzar Flancheg a va be kinniget brasaat porzh Douarnenez. Nann, nann, ar c'huzul kêr neuze na falle ke defñ. Setu perak ar yaouenkichoù 'rank mon kuit da c'hounit o buhez e lec'h all hag ar vro a teu da veañ or vro tud kouzh.

An ta' kuññ zo deut da Zouarnenez 'vel mous bihen en or fritur. O, reuzeudik awac'h va e stad pa e deut, uzet awac'h 'va e otou var e fesken hag or botoù koad en e dreid. Me, tamm ha tamm, n'eus graet e blas 'vel just hag e be dimeet d'or c'henitervez defñ, a deus ar mare-se a noe me choñj dign pavar ugen mil lur danve, a vei minorez, acour 'vel just. Ha deus ar pavar ugen mil lur-se n'eus saet or fortun spontus. Me, va ke re onest en e aferioù. Da skouer, ar re a verzhe defñ eol pe houarn gwenn evit ar bouestoù, ar pezh a noe im en e fritur, a va an Otrou P... a noe ar garg da verzhiñ an drae evit on ti. Ha Beziere



143 DOUARNENEZ. — ÉTABLISSEMENTS RENÉ BEZIER. — NETTOYAGE DES BOÎTES. — LL

Aman merc'hed ar c'horve, gwel a rit, mei gad he rastell. Ar bouestoù vie lakeet da virviñ goude ma vien karget, ha goude pa teuyen er maez deus ar bouilhot a vien sec'het.

a vouie mêvif an Otrou P... hag a raye def prijoù kalz re ijel, me pugur a noe sinet ar prijoù-se, eoñ ranke dougen an toaz d'ar forn. Ha na jome ke def netra 'vel gounit vit e labour, er c'hontrol, a-vechoù vie var goll. Ha bugale an Otrou P... noe diane darpenn o zad a gave re vat e vanne, ha pa va etre daouarn Beziars kouzh a raye ato aferioù fall. An Otrou Beziars kouzh ue noe or vrud divalo e-kichen ar merc'hed, merc'hed brav e fritur, ato a glaske reuz deuzouto. Hag a-vechoù a teue a-benn. Ha choñj am eus deus or vaouez kouzh a vie lavert deuzouti Len Beziars. Or verc'h a noe bet, hag an holl a lavere ar verc'h-se 'va deus Beziars. Tri mab Beziars a va, un a n'eus kemert e blas hag a va or rener mat. Met tud start evit ar gonedegezh. Ar mab henañ a lavare pa va e penn ar friturioù, ar vicherourien en e di nie ket allet chom e grev e-pad pell pugur na raye deo nemet trowac'h da gowet da zribif evito hag evit o bugale. Me, na vegn ke karet aneo. Prenet noe kalz douaroù e Treboul, douaroù 'vit netra, ha saet a noe tired e Douarnenez. Toud an douaroù lec'hiet ar bravañ 'zo be prenet ga potred ar friturioù. Beziars noe or fritur var Douarnenez, ha goude noe saet or fritur ue evit e vouestoù gollo. Met ar fritur -se na labore ken evitañ. Me, goude a n'eus be saet friturioù penn 'a benn ar c'hoste. Noe un e Kiberen, e Bel Il... Duvetac'h e vab bihen 'zo aet d'ar Marok da zevel ar fritur, met sur awac'h na va ke kalz a dalvodegezh ennañ kar n'eus graet aferioù fall tre. Or mab all zo be dimeet ga merc'h or meilhar noe graet or fortun vras... Un all zo be dimeet er Mour-bihen. Goude, zo be prosez etre ar botred hag e bet aet fritur Beziars da netra.

Ar re Chancerelle, me choñj dign ign deut deus Naoned. A va ue kalz a vreudeur. Hag un deuzouto a noe or fritur en Ene Tristan. Ha, surtoud merc'hed Treboul



a laboure ae. Met pa va achu al labour, ma va uhel ar mour a ranken treuzifñ gad or c'hano bihen. Hag on de, matreze 'va rust ar mour en de-se, setu ar merc'hed mon er c'hano bihen, ha noe ket evezhiet, vegn aet re deus ar memes koste, hag a va be chaviret ar c'hano treizhour. Ha va be beuzet fezek aneo. Hag a vegn intereset e bered Treboul an eil e-kichen eben, fezek be memestra.

Fritur Grivard, honne 'zo be devet ; fritur Grivard er Yed ae, va kroget an tan enenni just er bla pavarzek d'an daou a viz Eost, hag e deus Treboul a va gwel a zae kalz mouged du deus ar fritur-se. Ha va deut on den var neuñ beket ar Yed da lavar sur a va on dramenak iskis er fritur. Pa va klasket chikour, a va re zuveet. Hag aboe n'eus ke be saet tra var an douarenn-se. Ha, pa e be rannet Douarnenez deus Ploare, ar maer kentañ 'zo bet e Douarnenez a va an Otrou Grivard.

Bugale ar re Chancerelle neuze o deus bevet 'vel bourc'hichen bras. Ya ! En hafv a vien ga bagoù bihen, yotoù 'giz ma ve lavert, hag er goñ neuze a va ar chase. Choñj am eus da velar Gastofñ Chancerelle hag e vreg or vech e tremen var ar pon bras, hag a va ar c'huzh-heol, ha morse na zijoñjign pegon kaer a va, an intron noe or marc'h gwenn. An drae 'zo chomet em daoulagad 'vel on dolenn, kar kaer a va da velar. Ha deus an amzar-se ue a vie redadoù kezeg var aod Ri. Vie dibabet e-pad an hafv pa vie ar mare mour ar brasañ ha setu pa vie ar mour an ijellañ a vie redadoù kezeg. Bep bla. Ha don a raye kezeg deus pep lec'h tro-var-dro. Deus Kempar, deus Plogoneg. O, ya ! Meur a redadeg a vie en abardae. Ha tud a teue. Ae va pin fi voar, ae va toud an dud penn da benn, hag ae na vie ke paeet plas, ijelac'h, tostac'h deus an aod, ae va an dud a enor, ae vie paeet plas. Me, tout tud kêr va ae var goste ar c'hoad bihen a-us Plomac'h da sellet deus ar redadeg. Ha choñj am eus, or marc'h 'va be koueet,

henne va da Gaston Chancerelle, a va be torret e bav ha va rafket la' ane... Me, goude ar vrezel n'eus ke bet mi redadoù kezeg evelse...

LEC'HIOU.

Porzh Kal... Nign a lavere Pos Kal, met Porzh Kad e e âno... N'ouzoñ ke perak e Porzh Kad. Nign a laver Pos Kal, 'giz a laverom ar C'hoasin, hag e ar C'hroaz-Hen. Giz Gerlosket, hag e Ker Lesket pugur Fontenelle a noe devet toud an tired a va ae, setu an drae a va ar Ger Lesket. Aman e Tal a' Groaz ; Penn ar C'hoad - koad Plomac'h a teue beket ae - a zo uhelac'h. Park ar marc'h a va pellac'h 'vit iliz Ploare, dustu ar Park kentañ ae plec'h va or maen hir da von e-barzh, ae va or maen hir bihen fi voar, deus an tu klei. Ae va Park ar marc'h... Matreze vie lakeet ar c'hezeg da redek ae ?... An drae va d'ar Verouri. Ha neuze goude, pellac'h ae, a va or venojenn vihen hag a bake Ri, hag henne va hen an Ankou a joñj dign... E Pouldeuilh 'zo an Ankou ue, hag an Esperañs hag ar Garante... An Troc'h Yalc'h. An Troc'h Yalc'h 'zo ae dustu pa zigoueeet da Gerc'haro : ar c'hroaz-hen-se e an Troc'h Yalc'h. Zirak du-se e Kerc'haro. Bremen neuze pa teuoc'h var du Pouldeuilh a zo an Ankou, an Esperañs neuze zo pellac'h var hen Gweien, hag ar Garante a va var hen Pouldraeged...

VIII

GOUEL AR ZAKRAMAN .

Gouel ar Zakraman a va... gotet... ar Pantekost, goude sulvezh an Drinded, Pardon Ploare hag ar zulvezh goude sulvezh an Drinded e ar c'hentañ sul ar Zakraman. Ha gwechall a vie div zulvezh ar zakraman. Da gentañ, evit kêr a vie fichet tre ar straedoù. Lakeet a vie zirak an ti pe liserioù gwenn pe ollec'henn kotoñs gwenn ha ru staget. Var an drae a vie peget bleunioù. Ha var ar straed ue a vie lakeet glachenn var ar zan hag e kreiz an hen vie graet tresadennoù gad ar bleunioù. Goude, on tammig duvetac'h a vie livet brenn-esken a bep sort liv evit obar tresadennoù. Setu an dud a gemere plas neuze var ar riblennoù da c'hotoz ar prosesion da zon. Da gentañ a vie or groaz douget gad or gwaz ha bugale ar skoulioù deus pep tu, ar botred da gentañ, ar merc'hed goude. Vie kaset memes bugaligoù tri pavar 'loa, toud e gwenn ar merc'hed bihen gad paneroù bihen var o feultrin ga' delioù roz e-barzh. Goude vie ar merc'hed brasac'h deus ar skoul, goude a vie ar vugale a noe graet o fask kentañ er blavezh -se, goude a teuye bugale Mari, goude an drae a teuye potred ar sonerezh gad or beleg hag a teuye neuze ar vachikoted hag ar veleien. Neuze da gentañ 'va ar groaz aour, ar merc'hed yaouenk a zouge banniel ar Verc'hez, banniel bugale Mari, bannieloù a vie a-hed al likerzh. Da prosesion ar pardon a vie douget delwenn Santez Ana hag ar Verc'hez gad ar bannieloù, me paz devezh ar Zakraman.



An drañ-man ar bagoù toñ er porzh, en aod vihen...  
Ar re men 'zo bagoù toñ.

Da brosesion benig' ar mour vie douget or vag vihen, a zo  
ae en iliz... An drae neuze da pardon benig' ar mour ;  
ar Verc'hez gad ar merc'hed yaouenk a va gwisket e gwenn,  
Santez Ana gad ar merc'hed gwisket e liv. Me, nign a va  
gad prosesion Gouel ar Zakraman. Goude ar veleien a teuye  
an de, gad an otrou person o tougen ar Zakraman hag or  
beleg a bep tu def. Ha peurliesañ an de 'va douget ga  
hoc'hichen Douarnenez, n'e ke ga forzh piv... Me, al  
leternoù a vie douget gad implijidi an otronij-se. Vel  
ar bannieloù hag ar groachoù a va douget ga martoloded, ga  
michirourien, ga maneuverien ar friturioù. Ar veleien a  
zibabe piv a zouge, ha galvet vioc'h deus ar gador brezeg  
ar zulvezh arok. Setu alies a jome ato ar memes familhoù,  
ar familhoù a vie anveet ar gwellañ gad an otrou person.  
Pugur an drae a va on enor, na vie ke refuzet. Arok an  
de neuze vie ar groaz aour kaer, an huni ponnerañ, an huni  
gaerañ. Be' va un e penn hag un arok an de. Goude an de  
neuze a va ar wazed hag ar merc'hed goude. Kalz tud a va.  
Me a lavar doc'h an drae arok ar vrezel ae, pa vegn me  
yaouenk, an dud a va ae a stoue an daoulin pa dremene ar  
Zakraman. Ha goude ma vie tremenet al likerzh, an dud a  
denne o liserioù, ha vie pres iston gad ar bleunioù vie  
be staget. An dud 'va er prosesion a c'houlle kowet or  
rozenn deus ar Zakraman. Aman e Tal a' Groaz a vie renket  
on otar. Setu a yeyom var an aod penn-a-benn ar c'hae,  
hag er Rozveur, neuze va ol lenn, ae va or repozoar. Evit  
ar prosesion-se, deus an tu all d'ar mour, deus Treboul  
neuze, a vie tennet tennoù, on dramenak hag a raye trouz,  
e-pad ma va al likerzh e tremen. Ar zulvezh kentañ, al  
likerzh a va goude an overn bred, setu a va on or deus an  
abardae pa va achu, brav tre. Hag ae a jome ar Zakraman  
var an otar pad ar zûn. Pardon a Galon Zakr a va d'ar  
Gwenar etre an div zulvezh . Loud deus an tiez  
labour a zarre. D'ar zul goude 'va deus an abardae al

likerzh, goude ar gouspiroù. Ar zulvezh kentañ a viz Eost neuze a va benediktion ar mour. Memestra a va. Toud ar bagoù 'va er porzh 'vie lakeet toud ar pavilhonù avarno.

An distagadur.

Dre vras ez eus daou seurt yezh e Douarnenez, evel ez eus daou rumm tud: "yezh var an aod" ha "yezh laez kêr". Etre Santez Elena hag ar Rozveur e vez graet gant yezh war an aod; adalek Tal ar Groaz betek Kroaz Talud hag ar Stankoù e vez graet gant yezh laez kêr.

Yezh laez kêr a zo gant A.G.. Hag ouzhpenn-se er yezh-se traoù a zeu dezhi deus he zud - daoust m'eo bet ganet hi e Douarnenez, bet o vevañ atav e Douarnenez, hag he zud deut da Zouarnenez pa oant yaouank-flamm. Bez ez eus en he yezh un nebeut doare-komz a zo tre "diwar ar maez". Da skouer e lavar:

eoñ [ɛ̃] ha n'eo ket eñ [ɛ̃] evel e Douarnenez; e lavar deñ [dɛ̃] (dezhañ) ha n'eo ket [dɛ̃]; e lavar [vɛp] (oan) ha n'eo ket [vwañ].

A hend-all ez eus gant he zoare da gomz plegoù kustum yezh Douarnenez (e keñver fonetik).

I4 vogalenn dre ar genou hag a c'hell bezañ renket evel-hen:

5	a		a
4	ê	ê	ô
3	ɛ	œ	o
2	e	ø	o
I	i	y	u
	A	B	K

5 derez digoradur a zo:

Al linennad A a zo: vogalennoù a-raok stegnet

" B " : vogalennoù a-dreñv stegnet

" K " : vogalennoù a-dreñv rontet.

E Douarnenez e vez graet gant [u] pa c'hoarvez alies d'ar rannyezhoù all ober gant [o]:

[mur] ha n'eo ket [mor]

[(n)ur] " [(n)or]

[skul] " [skol].

A-hend all ez eus e Douarnenez ur renkennad vogalennoù digor-tre dirak -c'h dreist-holl:

[fêx] c'hwec'h

[lêx] leuc'h, luc'h

[môx] moc'h.

[a] a vez implijet pa vez hir ar vogalenn hag [a] pa vez berr:

[bra:s] -> [bras:ax].

N'eus ket kalz a vogalennoù dre ar fri e Douarnenez. N'eus nemet pemp. Bez ez int:

[ɛ] evel e den; gwall-nebeut implijet eo ar vogalenn-se.

[ɛ̃] evel e lun, leun, prun, h.a.

[ɔ] evel e mont, dont, kalon, alon

[ã] evel e skant, kann, sant

[i] evel e chink.

Bez e c'heller strollañ anezho evel-hen:

4      ã

3      ɛ̃      ɔ

2      ɛ

1      i

Un daolenn sebezus awalc'h eo.

E keñver kensonennoù ez eus:

p	b	m
f	v	
t	d	n
s	z	
ʃ	ʒ	
k	g	ŋ
x	χ	
l		
r		

N'eus kensonenn -h ebet.

Ar pezh a zo da vezañ notet e-keñver distagadur Douarnenez eo kement-mañ:

. bez ez eus ur c'houblad mouezhiet/divouezh evit ar geasonenn a-dreñv [x]-[χ], ar pezh a zo ral a-walc'h e Breizh;

. ne vez kavet an heuliad [xw] nemet dirak [a] (c'hoar, c'hoant, c'hoarvezout). A-hend all e kaver [f] pe [v]:

fi ha n'eo ket c'hwi

feubar ha n'eo ket c'hwevrer

fesi " c'hwesa

fezi " c'hwezañ

futellat " c'hwitellat

alve " alc'hwez;

. e dibenn ur ger, goude [a], e vez peurliesañ kavet ur

[χ] ha n'eo ket [r]:

kraonac'h ha n'eo ket kraonar;

. un dibenn [-ar] a zo e lec'h ma vez lavaret [-er]  
e lec'hioù all:

kigar ha n'eo ket kiger;

. distaget e vez [j] pe [lj] ha n'eo ket [ʎ] (1 glebiet)  
[dijet] pe [diljet] ha n'eo ket [diʎat].

GERIOU.

alon: holen  
an ne-mañ-nen: an den-mañ-den  
hag a-pochub: ha zoken ma...  
arj, mont en arj: mont e fulor  
ar c'hwi: ar c'hoc'hu'  
a dreuen: vb. dleout: a zleen  
a vouie skoeiñ var e beultrin: a oa kustum da skeiñ  
war e beultrin  
be' be': bezañ bet  
bilh (tolar...) tirer au sort  
bilhabantou: (c'hoari...) ur c'hoari gant eskern bihan  
bleñjal: garmiñ  
blot: pesked bihan-tre, re vihan da vezañ debret gant an  
dud  
boc'hij, borc'hij, bolc'hij: bourc'hiz  
boutoù-nizoù: heuzoù  
briel: brezhel (liester: brilli)  
brezel: ar vrezel (gwregel e Douarnenez)  
buruzenn (où-): chupenn ar vartoloded  
kac'halanik: bugel dister  
kalve va'r maez: charpantour  
korbellour (ien): marc'hadour pesked (mareyeur)  
krak - lak: mevel, micherour dister

kram: kambr  
kravezh daou-bennek: kravazh  
kreiz-den: un den a vent kustum (na bras na bihan)  
daou-lemm: an daou-limon  
deñ: dezhañ  
darpenn, trapenn: peogwir  
diskoulmet: a noe diskoulmet, e oa krog da greskiñ  
duveyañ: diwezhañ  
dispennet: daspugnet  
dislialde (kaout...): gwelout traoù marzhus  
distagallet: teotet-lemm, teotet-mat  
draebon: trev  
dramenak (un...): un dra bennak  
eoñ: eñ  
euilh: avu  
faec'h: c'hwec'h  
fi: c'hwi  
fritur: labouradeg  
failhout: mankout  
gorailhoù: bouzelloù + kalon + skevent ul loen lazhet  
(e ti ar c'higer)  
gotet: gortozit  
hi-ze: hi neuze  
lakaat ar voul-zu: pa n'eus ket mui ezhoñm pesked en ul  
labouradeg  
lantik: paotr diwar ar maez  
mabae: emichañs (me ' bari)

mestrouar: mestr ur vag  
mellgwadeg: un tamm mellgwadeg, rost hoc'h  
mousig fall: ur paotrig  
nani: an hini  
overn: oferenn  
on de de kentañ ar bla': un devezh kentañ ar bloaz  
padout: ne bade ket komz, ne grede ket komz  
pasadenniñ: didoullañ (loeroù, h.a.)  
parez - ar barez - [ar 'ba:res]: la paroisse, gant un a hir  
hag un r hepken e Dz.  
pennour: pennhêr  
ranig: en o ranig, noazh-pilh  
roñseed: kezeg  
rustumellad: bandennad, strollad (bugale)  
sorienniñ: kentañ istorioù, huñvreal  
stranikañ: laerezh traouigoù  
Stankoù: ar Stankoù Don, ur c'harter eus Dz. war du  
Pouldeuilh  
taked: (on taked dour) takadenn  
taltous: (unan) bihan ha treut  
Tal a' Groaz: kreiz kêr Douarnenez  
tarzh: tarzh-mor  
tired: tiez  
tolar: vb. teurel  
tamm: tud zo noe tamm ti... , tud 'zo n'o doe ti ebet  
ue: ivez  
vie: veze, vije



var vol: ouzh stur ar vag  
ur vouez-dour: ur wazh-dour  
zik: paotr diwar ar maez (war-dro 1920).

Lesanvioù.

Jos Tol Deo:

Ur martolod a oa bet lesanvet evel-se peogwir,  
sañset, e oa aet e wreg gantañ ur wech da besketi sardin.  
Deut ar mare da vouetiñ, e tiskoueze, marteze, ar mestr  
bezañ pizh un tammig gant ar greun. Setu ne baoueze ket e  
wreg da lavarout dezhañ: "Taol de'o ta, Jos! Taol d'eo!"  
Setu, evit teodoù lemm martoloded Douarnenez, e oa chomet  
hennezh "Jos Tol Deo".

Ar Martir Kouzh:

Lesanv va zad-kuñv, eus tu mamm va mamm. Anvet evel-se  
peogwir e lavare atav d'an dud "paour kaezh martir" pe  
"martir paoul".

